


inbourch



N i v e r e n n 47

15 K E R Z U 1973

IMBOURC'H, KELAOUENN BOLITIKEL

Pevare bloavezh

Niverenn 47

15 Kerzu 1973

Ali d'ar goumananterion.....p.346
Diwar-benn ar frammadouriezh, gant Fañch Keraen.....p.347
Burutelladur TI PRI, gant Roc'h.....p.363
Adc'hanedigezh porzhioù Breizh gant Erwan Henaff,....p.367
Notennoù diwar-benn an impalaouriezh gant H. Kervevan,....p.371
Dielloù : an Emsav hag ar sponterezh gant Jakez ar Bihan..p.379

Koumanant-bloaz : 30 lur. K.R.P. Y. Ollivier. 1534 25 Roazhon.
Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver. Priz an niverenn-
mañ : 4 lur 50

Ar pennadoù a zo da gas da Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud, 35 000
Roazhon.

CPPP 50 015

 D I W A R - B E N N
 A R
 F R A M M A D O U R I E Z H
 g a n t
 F a ñ c h K e r a e n

N'eo ket ar politikerezh ur pleustrezezh pe ur c'helvezerezh nemetken. Kavout a ra e wrizioù en ur brederouriezh hag un drabedoniezh bennak. Ne gav ket deomp, da skouer, e c'heller diorc'hañ a-grenn ar pleustrezezh marksat diouzh diazezoù prederouriezhel ar varksouriezh hec'h unan. E devoud avat ez eo diazezoù ar brederouriezh varksat amsteriek e keñverioù zo. Ha moarvat e rank ar re a nac'h

serriñ mab-den er bed e unan bezañ war ziwall ouzh emplegadurioù hag heuliadoù ar bedveizadur marksat. Muioc'h war ziwall c'hoazh e rankont bezañ avat ouzh prederouriezhoù arnevez zo evel ar frammadouriezh, muioc'h kempoell marteze eget ar brederouriezh varksat, hogen a denn da nac'hañ pep peurdalvoud ouzh mab-den ha da lemel e ster digant ar politikerezh.

=====

Ar goulenner

Abaoe ur pennad zo e klever komz eus ur brederouriezh nevez hag a zo anvet frammadouriezh gant an holl. Laouen e vefen e tisplegfes din petra a intentez gant ar ger-se.

Ar prederour

A-raok komz eus ar frammadouriezh e rankan kregiñ gant ster ar ger "framm". Kompren a rez : n'eus ket bet ezhomm gortoz ma teufe ar brederourion a-vremañ evit gwelout ar gwirvoud evel frammet.

Ar goulenner

Ha barrek e vefes neuze da sklerijennañ ar poent-se ? Mat e vefe termenañ ar ger a-raok mont pelloc'h gant an displegadenn.

Ar prederour

Kemeromp ar ger galleg "structure". Dont a ra eus ar ger latin "structura" a zeu e unan a ziwar ar verb "struere". Ar ger-mañ a dalvez kement ha lakaat a-gevret, sevel ; "structura" a vez implijet evit envel ul labour mañsonerezh, ha dreist-holl an neuz anezhañ. Komzet e vez

eus fra mm ur frazenn pe ur brezegenn, framm un aridennad menezioù ha me ' oar... Betek henn ne welomp nemet traoù ma vez distag al lodennoù anezho. Tamm ha tamm ez eo deuet ar ger da gaout ur ster all ; merkañ a ra, er c'hontrol, ur c'hevredad a elfennoù stok-ouzh-stok, un hollad m' emañ an elfennoù anezhañ ken liammet ken ne dalvez hini ebet anezho nemet dre an darempredoù o deus gant ar re all.

Ar goulenner

Setu neuze ar pezh a anvez frammadouriezh. Bez ez eo ar skol brederouriezh a wel an traoù evel holladoù ma vez an elfennoù enno ken stag an eil ouzh egile ken ne c'heller stekiñ ouzh un elfenn hep ma vefe distrujet an hollad a-bezh.

Ar prederour

Arabat mont re vuan. N'eo ket tamm ebet an dra-se. Goude e vo gwelet ar frammadouriezh a-vremañ. C'hoant am befe da laret ez eus bet ur frammadouriezh pell a-raok an hini a-vremañ, daoust ma seblant dit moarvat n'eus nemet meskaj em spered.

Ar goulenner

E gwirionez ne gomprenan ket mat.

Ar prederour

Aes tre koulskoude. Abaoe pellzo ez eus bet diazezet ur gelennadurezh ma vez hervezi - ha dreist-holl er vredoniezh hag er vevoniezh - an elfennoù kenereet an eil ouzh eben. Kemer evel skouer ar pezh a vez anvet en alamaneg ar "Gestalttheorie" : bredoniezh ar furmoù, da vihanañ ma vez implijet ar ger en ur ster oberiek, ar pezh a laka ar boudoù da vezañ pezh ez int, ar pezh a ra o natur. Tu a vefe da lakaat "framm" e-lec'h "furm" met ret e vefe neuze reiñ ur ster oberiek d'ar ger. En ur savadur bennak,

ar pezh a vir ouzh an holl vein lakaet a-gevret a en em zigenstrollañ, ar pezh a ra unvander an hollad evit ma ne gouezhfe ket ar savadur en e boull, setu petra eo ur framm.

Ar goulenner

Neuze e klenkez ar "Gestalttheorie" e-barzh ar frammadouriezh ?

Ar prederour

Ya, sur, peogwir e tizolo frammoù. Adalek 1890 en doa diskouezet ar bredoniour alaman Ehrenfels e veze merzet furmoù pa selaoued ouzh un ton bennak. Lakaet en doa an dra-se a-wel war dachenn merzadoù ar c'hleved. Arabat krediñ e vefe klevet ar sonioù an eil war-lerc'h egile ha liammet goude gant ar spered evit ma teufent da vezañ an ton-mañ-ton. Ar framm anvet "Viens Poupoule..." pe "Gwir Vretoned" n'int ket diwanet diwar atiz ar spered en dije krouet an ton en ur chadennañ ar sonioù distag. Notennoù an tan-mañ-ton n'o deus ster ebet drezo o unan; o ster hag o zalvoudegezh a zeu eus ar roll a c'hoariont en hollad, eus an darempredoù o deus gant an notennoù all. Un darempred etre sonioù, setu petra eo un ton. Ha ma fell dit ur brouenn, n'eo ket diaes : tu a zo da dreuzlec'hiañ an holl notennoù hep ma vefe kemmet "framm" an ton. Tu a zo ivez da seniñ gant ur fleüt, un trompilh hag ur gourc'horn hag e vo anavezet an hevelep ton. En ur ger - bez ez eo bet Ehrenfels an hini kentañ o tiogeliñ n'eo ket ar santadoù a vez da gentañ (evel ma soñje ar vredoniourion glasel), ar merzadoù, ne lavaran ket pe, mar fell dit, an holladoù.

Ar goulenner

Trugarez evit ar skouer ac'h eus kinniget. Kavout a ran sklerijennus an diforc'h a rez etre santadoù ha merzadoù. Padal, a gav din, o deus ar vredoniourion-se studiet dreist-holl tachenn ar gweled.

Ar prederour

Ar gwir a zo ganit. Hag an holl a bouez war an hevelep mennoz : ar furmoù eo a vez gwelet adal an taol-kentañ.

Ar fazi e vefe krediñ e teverfe ar furmoù diouzh obererezh ar meiz a lakafe urzh en holl santadoù oc'h anadiñ da gentañ en un doare disneuz ha liesseurt. Da noz, pa sellit ouzh an oabl, n'eo ket c'hwi a gement a genaoz ar stered hag a ra diouto ur steredeg. Ar steredeg a zo aze adalek an deroù ; ar steredeg eo a spurmantit diouzhtu, da laret eo ur framm. Heñveldra evit ar filmoù: n'eo ket ur film ur steudad a skeudennoù distroll ; ur furm eo hag a ro he zalvoudegezh hag he ster da bep skeudenn. Evel ma lavar Merleau-Ponty : ur film a zo, a-raok pep tra, ur furm amzerel. Degas a ran da soñj d'ho spered arnodadur brudet Poudovkin a ziskouez splann pe unded he-sonel eo ur film. Poudovkin a fiñvskeudennas un deiz c Mosjoukin, dezhañ un dremm difrom hag a lakaas da dremen araozañ, da gentañ un asiedad soubenn, goude-se ur plac'h yaouank marv en hec'h arched hag erfin ur bugel o c'hoari gant un arzhig graet e danvez grognonek. Merzet e voe e seblante Mosjoukin sellout ouzh an asied, ar plac'h yaouank hag ar bugel ; dirak an asied e hañvale huñvreal ; ouzh ar plac'h yaouank e selle gant glac'har ; ouzh ar bugel gant ur mousc'hoarzh skedus ken e vane ar selaouerion bamet dirak birvidigezh e zremm daoust ma oa bet impijet teir gwech an hevelep taolenn hag e oa houmañ divev a-grenn (1). Rak-se ez eo stag ster ar skeudenn ouzh ar re a dremen araozi er film ; ganto o tont an eil war-lerc'h eben e vez krouet un dra nevez hep ma vefe an dra-se ur sammad eus an elfennoù a zo er film.

(1) Kv. Merleau-Ponty. Sens et non sens. P.97.

Ar goulenner

Hag ar vevoniezh, hag e c'hoarvez memestra ?

Ar prederour

Betek henn em eus dibabet va holl skouerioù er vredoniezh. Kerkoulz all em bije gellet laret e vez implijet geriaoueg ar "Gestalttheorie" gant ar vevoniou- rion, dreist-holl diwar levezon Goldstein. Hemañ en deus degaset ur mennoz hag a seblant bremañ bezañ boutin : n' eus ket tu d'ur venvegenn bezañ disrannet diouzh an holl- lad maz eo lod anezhi. Adlavarout a ra Goldstein dibaouez : ez eus un hollad eus ar benvegad, ez a ar benvegad endro evel un hollad hag ez eo kenstag an holl lodennoù anezhañ. Merzet en doa an dra-se en ur bleidiñ gant gloazidi ar brezel 14. N'eo ket hepken ur galloud bennak - ar galloud komz, da skouer - a veze distrujet gant ur dhloazadenn-empenn ; kemmet e veze emzoug un den penn-da-benn. Dont a rae d' en em serriñ warnañ e unan.

Ar goulenner

Komz din bremañ eus ar yezhoniezh a vremañ. Hag e kav dit e vefe ret gwelout ar yezh evel ur framm ?

Ar prederour

Gwir eo. Gant oberennoù de Saussure e krog ur mare nevez e studi ar yezhoù. Nac'h a ra hemañ teurel evezh ouzh emdroadur ar yezhoù. Klask a ra tizhout mareadoù difiñv eus ar yezhoù ("des états des langues") hep darc'hel kont eus levezon an istor warno. Dibab a ra un hentenn nevez : gwelout ar yezhoù evel frammoù ha klask gouzout penaos ez a endro ar reizhiadoù yezhel. Eñ an hini eo a rae an diforc'h hag en devo kement a bouez evit dazont ar yezhoniezh, etre yezh ha lavar. Evit komz e reer implij eus ar yezh-mañ-yezh : ar saozneg, ar galleg, ar brezhoneg, en ur ger eus ur reizhiad a arouezioù. Ha koulz laret, ne bled De Saussure nemet gant ar yezh, anezhi ur c'henderc'had kevredigezhel. "La partie

sociale du langage, extérieure à l'individu, qui à lui seul ne peut ni la créer ni la modifier..." ("Cours" p.31).
Krouadenn ar gevredigezh eo ar yezh eta, ret dimp he degemer evel m'emañ evit gellout eskemm mennoziou gant ar re all. Ha war ar marc'had ez eo an ensavadur kevredigezhel-se ur reizhiad ma n'en deus enni pep arouez talvoudegezh ebet, nemet e vefe dre an darempredoù en deus gant an arouezioù all. Keñveriañ a ra peder gwech ar yezh ouzh ar gwezboell, o tiskleriañ dre aze n'eo ket stag talvoudegezh ar pezhioù (pe an arouezioù) ouzh un danvez a zo oc'h ober anezho (hag e vefent e koad pe en olifant hag all) - met kentoc'h ouzh al liammoù o stag kenetrezo. Al lavar avat a zo un dra all : ur gwered (1) hiniennel a zibab a vez sevenet gant pep hini ac'hanomp evit eztaoliñ hor soñj. Hogen notit an dra-mañ ; a-bouez-bras eo : n'hon eus ket betek henn afer ouzh ar pezh a zo anvet "frammadouriezh" er mare-mañ ; rak ar frammoù-mañ a zo anezho en devoù (2).

Ar goulenner

Laouen e vefen neuze e tiskouezfes din peseurt diforc'h a zo etre ar frammadourion a-wechall hag ar re a-vremañ.

Ar prederour

Kemplezh meurbet eo ar gudenn ha marteze e c'hellfen faziañ. D'am meno avat e vez anvet frammadourion er mare-mañ skiantourion hag a sav patromoù evit displegañ ar gwirvoud.

Ar goulenner

Peogwir emacout o komz eus ar yezhoniezh ha barrek e vefes da zegas ur skouer evit ober un diforc'h etre framm ha patrom ?

Ar prederour

Ur yezh n'eus ganti nemet ur framm. Hogen evit

(1) Akt. (2) Fed. Uheloc'h : GWEZBOELL/chedoù.

rentañ-kont eus ar framm-se e c'heller sevel patromoù dis-
heñvel a-walc'h. Patromoù hag a zo savet hervez temz-spered
an enklasker, hervez e stummadur, e brederouriezh, ar
c'hoant a zo gantañ da lakaat ar patrom-se da dalvezout
evit skiantoù all... ha me 'oar.

Tu a zo din, mar kerez, d'ober meneg dit eus
meur a batrom yezhoniel, patromoù Bloomfield ha Pik, patrom
Hjelmslev, hini Jakobsen, hini Chomsky hag hini ur Gall
brudet, Martinet en deus ijinet ur patrom anvet "la double
articulation du langage..."

Ar goulenner

Ac'hanta! Ro dimp un tañva eus damkaniezh
vMartinet.

Ar prederour

N'eus forzh peseurt lavarenn a c'hell bezañ
dielfennet, rannet en ur steudad a unanderioù a zo dezho
un neuz vouezhiel hag ur ster. Ma lavaran "poan-benn am eus"
e verzan aze pevar unander oc'h en em heuliañ, - unanderioù
a zo anvet "monèmes" gant Martinet. Ne c'heller ket o daou-
hanterañ hep ma vefe lamet kuit o ster.

Gwelet ec'h eus ne oa ket tu da zielfennañ al
lavarenn en unanderioù bihanoc'h mar fell dimp mirout ur ster
d'ar gerioù hor boa dibabet. Hogen pep ger meneget ganimp
a c'hell bezañ rannet e unanderioù ma c'heller drezo, da
skouer, digemmañ "poan" diouzh "doan", "koan", "goañv". Evit
ar ger "poan" ez eus ennañ tri unander "P/O/AN/" Anvet int
gant Martinet "phonèmes".

Un dra da c'houzout c'hoazh, hervez damkaniezh
vMartinet : ne zifluk ket ar ster diouzh ar monemoù hag ar
fonemoù, ur wech lakaet ar re-mañ kichen ha kichen. Diwanañ
a ra ar ster an "direzadurioù" (1) pe an digompezadurioù
kenaozet ha koublet hervez lezennoù un aroueziad (2).

(1) "Diliveadurioù". (2) Dibab a ran ar ger "aroueziad" evit
treiñ ar c'herienn "code de langage".

Bez ez eus un aroueziad evit ar yezh a zle bezañ dizoloet gant ar yezhoniezh. Mont a ra ar yezh en-dro evel un ardivink sturiekaet (1). Spered an den e unan a zo un ardivink aroueziadet (2) a zegemer stlenn hag a zeveiz (3) anezhañ war-bouez e aroueziad. Eus an deveizadur-se e tiwan ar ster.

Setu aze ur welidigezh frammadurel eus ar yezh. Ar pezh a gont n'eo ket elfennoù ar yezh kemeret hini hag hini met an darempred o deus gant an elfennoù all. Lec'hiadurel⁽⁴⁾ eo o zalvoudegezh a zever eus kenelfennerezh ar gerioù e diabarzh ar framm e-lec'h m'en em gavont hag e-lec'h m'int urzhiet diouzh un aroueziad. Ha ma vez kemmet lec'h d'un elfenn bennak e vez kemmet ivez an elfennoù all evit ma c'hellfe ar framm renet gant an aroueziad chom digemm. Ar ster n'eo ket krouet ken gant an den evel ma soñje d'ar brederourion a wechall ; dibourc'het, diberc'hennet eo eus e zellidigezh trabedel, eus e roueelezh speredel ; didronet eo gant ur reizhiad dibersonel a arouezioù a zo krouet ganto ur ster dre maz int kenelfennet hervez lezennoù un aroueziad ez eo kefridiezh ar yezhoniezh dispakañ.

Ar goulenner

N'eo ket gwall aes da gompren ar pezh emañ o paouez dezrevell. Pa vez komzet eus frammadouriezh ne vez ket graet anv eus ar yezhoniourion, - eus Lévy-Strauss, Althusser, M. Foucault ha Lacan, ne lavaran ket. Hag ul liamm bennak a zo etre an dud-veur-se hag ar yezhoniezh frammadurel ?

Ar prederour

Eveljust ez eus ul liamm. Eus ar yezhoniezh eo diwanet pep tra. Met a-raok kregiñ e rankan notañ kement-mañ : marteze ez eo fall ober implij eus ar ger "frammadouriezh" evit komz diwar-benn an "dud-veur"-se,

(1) "kubernetek". (2) "Codé". (3) "Interpréter" (4) "Positionnel"

evel ma larez. Plediñ a ra gant tachennoù liesseurt ar studiadennoù bet savet gant ar re-se. N'eus nemet un dra hag a zo heñvel ganto holl : an hentenn, an ezhomm a zo ganto da lakaat urzh e "skiantoù an den". evel ma teufent da vezañ "skiantel" e gwirionez. ("souci de scientificité" hervez o zrefoedaj). Hag en abeg da se e kemeront ar frammyezhoniezh evel patrom. O vezañ m'he deus diskouezet houmañ e oa frouezhus hec'h hentenn o deus klasket ar re-mañ kemer skouer warni. Ha zoken, dre m' he doa ar yezhoniezh roet lañs d'ar skiant o deus kredet darn anezho ne oa ket ar yezh un danvez a imbourc'h nemetken, an danvez nemeti, ne lavaran ket.

N'eo ket a-walc'h da Lévy-Strauss dibab ar yezhoniezh evel hentenn evit kas da benn e imbourc'hadennoù tudadel (1); kemer a ra anezhi evel an danvez nemeti evit skiantoù an den : "Linguistiques et sociologues n'appliquent pas seulement les mêmes méthodes ; ils s'attaquent à l'étude du même objet. Cet objet est la communication." (2) An eskemmoù-merc'hed er sevenadurioù kentidik ne vezont ket renet e n'eus forzh peseurt doare : sentiñ a reont ouzh reolennoù resis, ken resis ha re ar yezh ; bez ez eus ur reolad evit o urzhiañ evel maz eus un aroueziad evit urzhiañ ar yezh. "Ar reizhiad a gerentiezh a zo anezhi ur yezh." "Daoust ma vez eskemmet merc'hed e-lec'h gerioù, kement-se ne vir ket hor befe afer iouzh an hevelep tra."

E berr gomzoù, deuet eo ar yezh da vezañ rouanez ar skiantoù denel ha kemeret eo evel skiant levieriez :

1) dre maz eo ur skiant hag a zoug frouezh hec'h hentenn ;

2) evit darn eus ar frammadourion, dre ma pled

(1) "Structures élémentaires de la parenté" p.612.

gant un hevelep danvez hag ar skiantoù denel en o fezh.

(1)

Ar goulenner

Neuze, war da veno, n'eo ar re-mañ nemet tud hag a ya da c'houlenn sklerijenn digant ar re nemeto a zo bet gouest da ziazezañ ur skiant denel a zellezfe hec'h anv a skiant. En ur ger n'eo ar frammadouriezh nemet un hentenn nevez evit diazezañ ur skiant denel. Koulskoude e vez rebechet outi bezañ dreist-holl ur gealiadurezh vreutaus (2). Petra a oañj dit ? Diskiant eo an tamall-se ?

Ar prederour

Ne larin ket se. Rak gant an holl frammadourion ez eus ur gealiadurezh splann. Ha ma'c'h eus komprenet va mennoz a-zivout ar yezhoniourion ec'h eus gwelet pegen arvarus eo ar c'healiad-se evit an den, o vezañ ma n'eo ket hemañ mestr war ar ster ha maz eo didronet diwar an uhelgador ma oa azezet warni a-gent.

Ar goulenner

Pe anv a rafes eus ar gealiadurezh-se ?

Ar prederour

Un enep-denelouriezh a rafen-me a-walc'h eus ar gealiadurezh-se. Hag an dra-se a gavan grevus tre evit dazont ar C'hornog. N'eus ket bet a gemmadur ken gwazh all en istor ar c'hornog abaoe an deroù, abaoe ar C'hresianed.

Ar goulenner

"Enep-denelouriezh" a larez. Sklaera ar c'heal-se mar gellez rak ne welan ket mat petra a lakaez dindan ar ger.

(1) "Anthropologie structurale" p.69. (2) "Ideologiezh".

Ar prederour

Kemeromp neuze istor ar brederouriezh adalek amzer ar C'hresianed kentañ, ar re o deus goveliet ar brederouriezh. Ar gudenn bennañ bet stignet ganto a zo kudenn ar furnez : penaos bevañ evel den ? Lenn a ran dit ur pennad eus Platon : "Petra e c'hell bezañ an drase, an den ? Evit un anien a seurt se, petra a zere outi ober ha gouzañv hag a rafe un diforc'h etrezi hag an anienoù all ? " (1)

Hogen n'eo ket a-walc'h lavarout emañ an den e-kreiz preder ar C'hresianed ; an talvoud uhelañ ez eo an den ivez evito; hag ar peurdalvoud-se a roont dezhañ dre maz eus anezhañ ar skeudenn eus Doue. D'o soñj ez eo ar Poell an hini eo a ra an diforc'h etre an den hag al loen. Doue a zo anezhañ ar meiz; hag an den, dezhañ ar galloud meizañ, a zo gantañ ivez ur galloud doueel, ur galloud a hañvala anezhañ ouzh Doue : "O vezañ ma oa eus gouenn an Doueed ez eo bet an den an hini nemetañ e-touez ar boudoù bev en deus savet aoterioù ha delwenoù." (2)
Pe c'hoazh : "En ur sellout ouzh Doue e kavimp ar c'haerañ meleziour eus an traoù denel... Setu pehini eo ar gwellañ doare evit en em anavezout hag en em welout..." (3)

Doue eo ar muzul evit an den, evit an ober. Hag an den a zo kouviet d'en em speredelañ, da zont da vezañ heñvel ouzh Doue "da zont da vezañ divarvel kement ha ma c'hell..."(4)
"An doueelezh a zle bezañ muzul pep tra, er barr uhelañ, kalz muioc'h eget an den..." (5)

Hag ar meizadur-se eus an den a vez kavet a-hed hon hengoun betek an amzer vremañ. Lenn Sant-Aogustin, Sant-Tomaz, Descartes ha zoken Kant. "Il appert que le fondement dernier de la philosophie kantienne doit être

- (1) Teætetes, 174b. (2) Protagoras, 322a. (3) Leñ Alkibiades 133cd.
(4) "Divezoniezh evit Nikomac'hos" X, 7 1177 b. gant Aristotelez.
(5) "Al lezennoù" IV, 716 gant Platon. (6) Eric Weil. Problèmes kantians. P.47.

cherchée dans sa théorie de l'homme. L'homme n'est que l'image de Dieu ; il s'ensuit que Dieu est l'original de l'homme." Eveljust, goude an XVIIIvet kantved ez eo krog an drabedoniezh da vezañ nagenet ha ned a ken ar brederourion da glask e Doue ur patrom evit displegañ natur mab-den. Koulskoude e kendalc'h an denelouriezh da ren. N'eus d'ober nemet digeriñ ul levr savet gant Sartre anvet "L'existencialisme est un humanisme". E feur, zoken, maz a an doueed da guzhat e vez gwisket an den gant o lifre. Evit Sartre avat n'eo ket a-walc'h d'an den kaout ar frankiz ; bez ez eo-eñ ar frankiz : an den a zo "existence" evel ma lavar ; divent eo e c'halloud, peurvut evel hini an doueed, peogwir ez eo dezhañ krouiñ e dalvoudoù evel ma kar : "Krouet ec'h eus ac'hanon dieub, Jupiter, ha da bep den eo dibab e hent..." (1)

Setu petra a anvan "denelouriezh" : ar weledigezh-se eus ar bed evel talvoud uhelañ hor sevenadur hag o deus embannet ar C'hresianed gant kement a nerzh, boemet ma oant gant kevrin mab-den. Dasseniñ a ra c'hoazh en hor skouarn komz ar c'hor eus ANTIGONE eus Sofoklez : "Kalz a draoù marzhus a zo er bed met n'eus ket unan a vefe ken uhel hag an den..." (2) Ar welidigezh-se an hini eo a vo diskaret gant ar frammadouriezh a gan a-unvouezh, goude marv Doue, marv e lazher. Rak daoust maz eo liesseurt ar c'helennadurezhioù frammadurel ez eus ganto holl un aviel nevez : an enep-denelouriezh an hini eo.

Ar goulenner

Lavar din neuze, berr-ha-berr penaos e welont an traoù ha petra e teu an den da vezañ en o reizhiadoù.

Ar prederour

Ne c'heller ket en un displegadenn evel houmañ dielfennañ damkaniezh pep hini anezho. Dilennomp, da skouer, mennozioù Althusser. Da soñj hemañ n'eo ket an "darvezelouriezh"

(1) SARTRE. "Les mouches". Antigone. gwrz. 332-33.

istorel" ur skiant eus an den ; ur skiant eus ar c'hevredigezhioù an hini eo. Ar re-mañ nemetken a zo anezho dangorennoù an istor(1). Pep kevredigezh a zo anezhi ur c'henelfennadur frammadurel, un hollad maz eus ennañ tri ensaviad (2) : an armerzh, ar politikerezh hag an ideologiezh. Ur c'henc'hoari a zo etrezo ha ne c'hellont bezañ kemmet nemet a-gevret e vefe daoust d'an daou ensaviad all bezañ devoudet gant an armerzh.

Gwelomp bremañ levr M. Foucault "Les mots et les choses" en deus graet kement a drouz e lagenn ar brederourion. Petra a lavar ? Bez ez eus, emezañ, frammoù diemskiant (anvet gantañ "a priori historiques") hag a nevesa - bewech ma vez kemmet ar sevenadur - ar meizad a skiant, ar skiant en he natur, ha n'eo ket hepken al lodenn-mañ-lodenn eus ar skiant. Da skouer, goude maz eo tarzhet ur skiant hag a verz er bed heñvel-derioù liesseurt, er c'hwezekvet kantved, lakaomp, e tinod er seitekvet ha triwec'hvet kantved ur skiant all a zielfenn, a genaos, a genurzh hag a jed pep tra. Goude-se e tiwan ur skiant istorel ha bedelour a bad abaoe an naontekvet kantved betek bremañ. D'ar mare-se eo ez eo bet krouet ar skiantoù nevez : ar vevoniezh, an armerzh politikel, ar yezhoniezh. D'ar c'houlz-se ivez ez ijiner ar "skiantoù denel" ... hag e teu an den da vezañ un danvez studi.

Ha petra a fell da vM. Foucault ? Hama ! En em zizober diouzh an den. Ha me ' lar dit, n'eo tener e gomzoù e-keñver ar re a fell dezho c'hoazh, emezañ, ober anv eus an den, eus e aotrouniezh, eus e rezid pe e zieubidigezh ; d'ar re-se ne c'heller respont nemet dre ur "c'hoarzh prederouriezhel" (pp.353-354). Ha c'hoazh : "Un ijinadenn eo an den ha n'eo ket bet krouet abaoe pell evel ma tiskouez doare henvedel hor meizañ... ha marteze ne bado ken pell." (pp. 398) Hag echuiñ a ra e levr evel-henn : "Diverket e vo an den evel war ribl ar mor un dremm a draezh..."

(1) "Dangorenn" = "sujet". "An den n'eo nemet ur'skor' evit an darempredoù-kenderc'hañ," emezañ en e levr "Pour Marx".

(2) "Instances".

Ar goulenner

Neuze e vez skubet kuit an den ; ne vez mui gwelet nemet evel un dra-war-ar-marc'had, un dreist-ezhomm, ul led-anadenn (1). Met er gont-se n'eus ken a zangorenn emren a vefe gouest d'ober un dra bennak drezi hec'h unan ha da reterañ an istor.

Ar prederour

Dres : kaset eo an den da sutal hag ar reizhiad an hini a ren pep tra. Ne c'hellan ket bezañ a-dugant seurt sav-boent. Eveljust, henn anzav a ran, n'eus ket a grouidigezh, a frankiz, nemet diazezet e vefent war ar retted ; n'eus ket a zen nemet amplegaouet, devoudet e vefe. Daoust da se ez eo dalc'hmat an den a gemenn marv an den, ez eo an den a verz ar reizhiad, ez eo an den a stourm outi.

Ar goulenner

Abarzh echuiñ em befe c'hoant a-walc'h da c'houzout penaos e tiskleriez e vije bet un troc'h, ur faout ken don e sevenadur ar C'hornog.

Ar prederour

Aze e pakez ac'hanon. N'anavezan kudenn ebet hag a vefe diaesoc'h da zirouestlañ.

Tri abeg a verzan : istor ar mennoziou, an uhelvennad a boellelezh skiantel, hag an degouezh armerzhel.

1) Istor ar mennoziou. Pa daolez pled ouzh emdroadur ar brederouriezh er c'hornog e spurmantez ar pezh a rafen anezhañ a-walc'h "dichal an drabedoniezh" ha "chal an netraouriezh", dreist-holl goude an naontekvet kantved, pa grog "prederouriezh an Diskred" - da laret eo Marx, Freud ha Nietzsche - da bouezañ war ar speredoù. Kemeromp Marks, lakaomp. Gouzout a rez n'eus ket evitañ a dalvoudegezhioù speredel, anezho nemetken dasskedoù eztaoladurioù eus ar c'horvoerezh, eus aralle kadur an den en e vuhez pemdeziek. Ha setu perak e lavar : "N'o deus graet ar brederourion betek henn nemet divuzañ ar bed ; poent eo henn

(1) "Epiphénomène".

~~treuzfurm~~ Evit pezh a sell Nietzsche e tivinez diouzhtu peseurt levezon a zo bet gant e vennoziou ha penaos he deus e brederouriezh - " a daolioù morzhol, "evel ma lar - tanfoeltret an uheldalvoudoù ma oa diazezet warno feiz ar C'hornog. Ha ma kemerez Freud... Soñj am eus bezañ lennet en unan eus e levrioù ("Unan eus diaesterioù ar 'vredelfennouriezh") pegement a lorc'h a oa ennañ da vezañ bet an hini en doa izelaet an den ar muiañ abaoe Kopernik ha Darwin, dre ma lakae a-wel e oa renet e vuhez, n'eo ket gant an emskiant, - gant nerzhioù-kuzh, islonk e blegoù-natur, ne lavaran ket.

2) Pouezet eo bet ganin dija war an eilvet devouder, da lavarout eo war c'hoant ar **gevredadourion** da "skiantelaat" ar "skiantoù denel". Pa oa e sell ar re-mañ da gas da benn o raktres edo trec'h an hanvoudelouriezh : Sartre, G. Marcel, Jaspers, Heidegger h.a., an holl anezho prederourion ha na verne evito nemet atebegzh an den, e rezid, e enkreuz, e zigenvezded. Hiniennelourion douet a oa anezho ha divarrek e oa o dangorelezh romantel da ziazezañ ur skiant wirion. En degouezh istorek-mañ eo e ranker lec'hiañ ar frammadourion. Soñjet o deus eta e oa ret difoarañ ar meizad a zen - anezhañ sichenn ar brederouriezh klasel - evit urzhiañ ar skiantoù denel.

3) Ouzhpenn-se e kredan ez eo marv an den e preder ar veizourion dre maz eo marv en un doare ergorel er gevredigezh a vremañ m'emañ ar c'halvezerezh hag ar skiant o vestroniañ pep tra. Emlod ar staelveliezh (1), trec'h ar galvezveliezh(1) ar saotrerezh, an ardivinkelezh h.a. Marv an den a zo bet arnodet gant hor rummoù tud a-raok ma teuje da vezañ danvez o freder. Pelec'h emañ frankiz an den ? Pelec'h emañ e c'halloud p'emañ ur bihanniver (hini an "deknokrated") oc'h sotrouniañ ar bed hag an dibersonelaat o vont war greskiñ bemdez ? Ideologiezh "marv an den" , petra eo nemet un heklev eus e sujedigezh armerzhel, nemet un dason eus e nannboudekadur

(1) "Bureverezh, teknokratiezh.

ergorel ? Santet e vez an dra-se en arz kerkoulz hag er brederouriezh, kerkoulz hag en "nouveau roman" e Bro-C'hall: Butor, Robe-Grillet, en "anti-théâtre" eus Beckett ha Ionesco, e filmoù Truffault ha Godard ("Fahrenheit 451", "Alphaville", "La chinoise") hag en oberennoù Lévy-Strauss pe M. Foucault; muioc'h eget diouganerion ur bed da zont ez int meleziourioù an hini a vremañ.

Ar goulenner

Petra ' vo da c'her diwezhañ ?

Ar prederour

Er mare-mañ e ranker ijinañ un denelouriezh nevez. An amkan da dizhout gant an den a vremañ a zo - vel ma lavare Aristotelez - "denelaat", da lavarout eo, d'an den adkavout e anien. Ebestel ar frammadouriezh n'o deus ket ar gwir da glemm diwar-benn an dizenelaat, an arallekaat p'emañ o ideologiezh o reizhabegañ hag o kadarnaat ar saviad istorel m'en em gav an den ennañ.

Fañch K E R A E N

=====

KENDALC'H AR PENNAD DIWAR-BENN "TI PRI".

Tu ' zo feurmañ ar film TI PRI dre skrivañ da :

C.I.N.D.E.P. (Cinéastes Indépendant De Paris)

103 straed Jean-Jaurès, 9 2 1 7 0 V A N V E S

Ur priz en deus bet ar film en ur genstrivadeg etrevroadel e OBERHAUSEN. Nac'het e oa bet gant ar C'hallaoued kinnig ar film-mañ. Ret eo bet da renerion ar festival divizout ne vefe a film eus 'Frañs' ma ne vefe ket hennzh.

Ouzhpenn 10.000 lur gall (ur milion) en deus koustet ar film-se da gCassard. Gant ar priz ma vez feurmet e c'heller bezañ sur e vo ur c'holl bras evit ar stourmer kalonek-mañ.

100 lur eo priz feurm ar film (war-dro 130 lur gant an TVA hag ar mizoù).

=====

B U R U T E L L A D U R

T I P R I

g a n t R O C ' H

Ur film e brezhoneg eo TI PRI. Gant Philippe Cassard eo bet savet. Gant skoazell Alan Stivell ha Beethoven eo bet aozet : Stivell evit ar c'homzoù (lennet eo gantañ an destenn); ha Beethoven evit ar sonerezh.

E Montroulez ez eo bet diskouezet, en M.J.C., dirak 150 den. Tud yaouank a oa deuet dreist-holl, hag ivez tud o vevañ nepell diouzh an TI PRI, e Lusivili, e parrez Plouigno. Diwar vuhez labourerion-douar paour eus Treger eo tennet danvez ar film bihan-mañ. Ugent munutenn e pad. Evit klokaat an òadenn e oa bet pedet strolladoù zo (CFDT, UDB ...) da zont evit ren un diviz gant an arvesterion, met n'eus deuet nemet unan : Cardiles, eus ar C.D.J.A.

Hervez ali an holl e oa rebechoù da ober d'ar film. Re ziaes e oa frazennoù zo. Da skouer : "Divizet eo bet an diskoulm gant frammoù kevredigezhel ha politikel, gant doareoù hag emdroadur an arnevesaat : gouzañvelezh pe dispac'h."

Poan o deus bet an holl da gompren ar gerioù-se distaget buan. Ar re zesketañ zoken a gave diaes kompren ar gerioù-se di-c'hortoz en ur film. Setu ur skouer all : "Heuliañ a ra ar gevelouri evel al laezherezhioù prevez ur politikerezh a arc'hoproù diouzh ar c'homentad, o skoaziañ en doare-se ar bourchaserion laezh bras. Ne vije ket bet ken diaes displegañ ar mennoz-se gant gerioù all eeunoc'h. Ne oa ket anavezet gerioù ar frazenn-mañ gant an tri-c'hard eus an dud er sal.

Eveljust seurt bommoù lavar ne oant nemet un darn vihan eus ar film ; barzhoniezh a zo ivez :

"Hor mistri ' zo estrenion
ha ni a sent outo.
Int a lar deomp :
n'eus ket ac'hanoc'h-c'hwil..."

An darn-vrasañ eus ar c'homzoù a zo frazennoù klevet digant tud TI PRI, daou labourer-douar o tanevellañ o buhez.

Met distaget e vez pep tra gant Alan Stivell. N'eus nemet un nebeut lavarennoù (e galleg!) a vez klevet war-eeun digant ar gouerion. Daoust d'he mennozioù ne grede ket ar vaouez komz e brezhoneg dirak ur benveg fiñvskeudennañ. Kentelius a-walc'h eo an dra-se.

Istitlet e oa ar film ha galleg a oa skrivet e traon ar skeudenn, pezh a oa a-bouez-bras evit ar re na ouient ket ar yezh ; a-bouez e oa ivez evit ar re all dre ma oa distaget buan ar c'homzoù ha diaes a-wechoù ; a-bouez ivez dre ma ne oa ket mat ar sonaozadur.

Ne oa ket dispar doare distagañ Alan Stivell a zibune ar c'homzoù un tamm re vuan ha gant ur pouezmouezh tenn da intent.

Rebechoù a zo bet graet ivez wae zanvez ar film : labourerion-douar o welout ar vro dismantret tamm ha tamm ; ur film trist eo.

Daoust da se e kav din ez eo mat ar fi'm-mañ. Ur varzhoneg a zo anezhañ, ken dre ar skeudennoù dispar, ken dre an destenn hec'h unan. Barzhoneg marv pobl Vreizh. Daou gonikl a weler o vervel, an eil gwenn, egile du.

Gwelout a reer tud kozh o ren ur vuhez diaes o unan penn. Aet eo kuit ar vugale da Sant-Brieg, Brest, Roazhon, Montroulez, evit gounit o bara. Emañ tud TI PRI o teurel ur sell war ar vro o koll he yaouankiz hag he yezh. N'eus ket kalz a labour er c'hêrioù. Ha koulskoude o deus kavet holl vugale an tiegezh-se labour e Breizh. Kalz a dud a zo o tilezel al labour-douar hag ar brezhoneg. Evit bevañ mat war ar maez ez eus ezhomm ùuioc'h mui a zouaroù.

- Ya 'vat, kement-mañ a zo o vont da get...

- Hon atant a zo an hini dwezhañ er c'horn-mañ ; n'eus nemet tiez marv endro deomp...

- Ur paotr yaouank, bouilh kenañ, en deus prenet pep tra. Savet en deus al lab-mañ evit reiñ bod d'al loened a c'hell peuriñ war dachenn an teir mereuri...

- Tennañ a ra d'ar 'Far-West...

Holl skeudennoù ar film a ziskouez an tiez o kuezhañ en o foull, ar vro didud, ar marv. N'eo nemet en dibenn e komzer eus ar stourm :

- Ha c'hwi, bugale, a zo ret deoc'h mont kuit da labourat d'an estrenvro, na c'hortozit ket dibenn ho puhez evit distreiñ d'ho pro. Hiziv eo e rankit stourm evit kaout labour amañ ha bremañ.

N'eo ket bet prizet kalz TI PRI e Montroulez gant an emsaverion o deus lavaret o soñj. C'hoant o doa e ve diskouezet dezho ur film stourm o kinnig un diskoulm. Evidon-me avat e ne gavan ket fall TI.PRI. Ret eo e varn evel m'emañ ha n'eo ket evel m'hon eus c'hoant e vije bet. Evit tud ar bobl ha n'eo ket evit emsaverion hepken ez eo bet savet ar film-mañ. Dre se e c'heller rebech ouzh ar film e yezh re ziaes. Mat eo avat ar film dre ma tiskouez splann d'an dud emañ ar vro o vervel. Er vro e vevomp bemdez ha ne verzomp ket ar c'hemmoù a c'hoarvez tamm ha tamm. Ouzhpenn-se ez aesoc'h chom hep soñjal en darvoudoù kriz ha klask ober evel pa ne vije ket anezho. An dra-se a c'hoarvez e Breizh bremañ.

Dre m'eo gwan an Emsav ha dre ma kav d'an dud n'eus netra d'ober evit kemmañ an emroadur e chomont en un huñvre. N'eo ket fall lakaat dirak daoulagad an holl stad truezus hor pobl. Anat eo marteze ez a fall an traoù er vro. Met n'eo ket splann evit ar bobl rak ne fell ket dezhi gwelout. Diaes eo sellout ouzh ar wirionez. Ma komprener stad ar vro e tleer asantiñ pe stourm. Ha ne fell d'an dud ober nag an eil nag egile. Ne zeu ar bobl er-maez eus hec'h huñvre nemet pa vez rediet d'henn ober. D'an dra-se en deus servijet an F.L.B.

Aze e c'hell bezañ talvoudegezh T PRI : rediañ an dud da welout ar pezh a guzhont o unan gant gevier gall ha digareziouù toull. Sellout ouzh ar wirionez avat a zo ar bazenn gentañ a-raok kregiñ gant ar stourm.

Dipitus eo TI PRI evit tud zo, dreist-holl ar stourmerion a oar dija epegen fall eo stad pobl Vreizh hag o deus ezhomm startijenn, kentoc'h, evit kas da benn ar stourm.

"Les chants désespérés sont les chants les plus beaux... a lavare ur barzh gallek (ma ne gomprenit ket, klaskit ebarzh geriadur gallek-brezhonek Roparz Hemon...) Ya, brav eo TI PRI, trist ivez, siwazh. _____ (kendalc'h p. 362

PORZHIOU EUROPAT AN
 ARVOR ATLANTEL
 (treizhidelloù 1971)

Dùn Laoghaire
 I W E R Z H O N
 Ros Lâr
 MOR
 Liverpool
 B R O
 SA O Z
 Abertawe
 IWERZHON
 KERDIZ (Caerdydd)
 Bristol
 Southampton
 London
 Aberpli
 (Plymouth)
 MOR BREIZH
 HANTERNOZ
 Amsterdam
 Rotterdam
 IZELVROIOU
 Antwerpen
 Dunkirk BELGIA
 (Dunkerque)

MEURVOR
 Rosgo
 BREST
 1 365 225 t
 NAONED/SANT-NAZER
 13 719 266 t
 LA ROCHELLE/PALLICE
 2 842 822 t
 BORDEAUX
 12 910 767 t
 F R A N S
 BAYONNE 2 709 922 t
 BILBAO
 11 419 145 t

LA CORUNA
 7 157 663 t
 VIGO
 1 675 043 t
 LEIXOES-PORTO
 5 552 279 t
 PORTUGAL
 LISBOA
 9 610 830 t
 SPAGN
 Sete Fos
 Marseille
 MOR
 Barcelona

SEVILLA
 2 709 414 t
 CADIZ
 715 939 t
 KREIZDOUAREL
 Alicante
 Cartagena
 Almeria
 Aljer
 Skikda
 Annaba
 Tanger
 Oran

Casablanca
 MAROKO
 ALJERIA

Testenn ar brezegenn distaget (e galleg) ³⁶⁷ d'an 10 a viz here 1973 dirak an izili eus "Kevredigezh ar Sternioù Breizhat", e Paris

A D C ' H A N I D I G E Z H

P O R Z H I O U B R E I Z H

gant Erwan HENAFF, Rener Kenwerzhel eus Porzh Emren Naoned-Sant-Nazer

E-pad pell amzer e voe merdeadurezh Vreizh e-touez ar re gentañ en Europa. Gwir e oa da skouer da vare hon daged YANN-4 ha YANN-5, pa nivered ouzhpenn 2 000 lestr-kenwerzh, warno ar banniel brezhon. E penn ar galloudoù-mor e oa hor bro d'ar mare-se e-kichen Bro-Saoz, Holland ha Portugal, ha pell-pell dirak Bro-C'hall. Petra omp deuet da vezañ abaoe ? Gant Feur-Emglev Roma he deus disoñj-et Breizh, pe dost, he galvidigezh vorel, dre ma oa ezel ur c'henvarc'had kevan-direl na gonté ket ar mor ennañ, betek derc'hent emezeladur reizhveur

Pal ar brezegenn verr-mañ a zo klask diskouez deoc'h penaos ez eo bet embreget bremañ strivcù bras evit adaptout an dachenn gollet, pegen pouezus e vo ar bloavezhioù a zeu evit hor porzhioù ha penaos ez eus tu d'ober kalz muioc'h c'hoazh.

Ar perzhioù-mat

E Breizh hon eus 26 porzh, war 72 er riez gall, da lavarout eo ouzhpenn un drederenn. E pempzek anezho e tremen nebeutoc'h eget 50 000 tonenn bep vloaz rak re vihan int ha ne glotont ket gant ezhommoù al listri nevez. Gant seizh porzh all ez eus un dreizhidell ("trafic") etre 100 000 ha 500 000 t bep vloaz. Gant pevar forzh hepken ez eus un dreizhidell a-bouez, tost pe a-us d'ur milion tonenn :

Sant-Malo	900 000 t
An Oriant	1 100 000 t
Brest	1 600 000 t
Naoned/Sant-Nazer	14 000 000 t

Gant ar porzh diwezhañ-mañ hepken ez eus ur ment etrevroadel, par da borzhioù europat all evel Lisboa ("Lisbonne"), Bilbao, Venezia ("Venise") ha København.

Treizhidell hollel hon holl borzhioù ne sav ket da 20 Mt, da lavarout eo nebeutoc'h eget 8 % eus treizhidell ar riez gall, ha nebeutoc'h eget porzh Dunkirk ("Dunkerque") e-unan penn. Dister a-walc'h eo.

Lezomp bremañ an tireoul a-gostez rak gwariañ a ra ar stadegoù : kreskiñ a ra bremañ dregantad Breizh un tammig bihan (9 %) met c'hoarvezout a ra an dreizhidell hollel eus 6,2 Mt hepken, da lavarout eo nebeutoc'h eget porzhioù Rouen (9,1 Mt), Dunkirk (8,4 Mt hep kontañ ar c'hailh houarn) pe an Havr Nevez (6,9 Mt).

Aes eo tennañ ur gentel eus ar sifroù-se : ur pouez dister a zo gant an holl borzhioù breizhat a-gevret e-keñver ar ramzed a gaver e Mor Breizh hag e Mor an Hanternoz. O gwander bras a zo o strewadur.

Tu a vefe da glozañ amañ gant ur penn mantret.

Ur fazi a vefe avat rak emañ an traoù o treiñ abaoe nebeut amzer. War a hañval hon eus tizhet penn-izelañ ar wagenn e 1970. Diskouezet splann eo gant an holl varnverkoù : ma kemeromp da skouer an diazez 100 evit ar bloavezh 1970 e sav skeulienn ("indice") ar porzhioù breizhat da 128 e 1972 ha skeulienn ar porzhioù gall da 112 hepken. Damheñvel eo an emdroadur-se ma ne gemerer ket an tireoul e kont rak tizhout a reer ar skeulienn 122 evit porzhioù Breizh ha 107 evit ar porzhioù gall.

(hep an tireoul)

	<u>Porzhioù Breizh</u>	<u>Porzhioù gall</u>
1966	90	73
1967	87	74
1968	89	80
1969	97	89

1970	100	100

1971	107	102
1972	122	107

Kenderc'hel a ra an emdroadur nevez-se er bloaz-mañ : e-pad an 8 miz kentañ he deus graet dija treizhidell an tireoul e porzh Naoned/Sant-Nazer ul lamm +28 % e-keñver 1972, tra ma chome kalz izeloc'h ar c'hresk er porzhioù gall.

Daoust ha gwir eo an emdroadur-se e Breizh en he fezh pe hepken e porzh Naoned/Sant-Nazer ? Aes eo respont : ul lusk hollet eo met ne dizh ket ar porzhioù bihanañ. E gwirionez, ma kemeromp c'hoazh ar stadegoù (hep an tireoul) gant an diazez 100 e 1970 e verker ez eus pemp porzh a zo aet war-raok e 1972 :

Brest	138
Sant-Malo	121,5
An Oriant	131
Lege	123,5
Naoned/Sant -Nazer	124

Gant ar porzhioù-se ez a ouzhpenn ar 4/5enn eus an dreizhidell vreizhat. Talvez-out a ra an emdroadur nevez-se evit Breizh a-bezh eta met sklaer eo e chom dister kresk ar 17 porzh bihan all e-keit-se.

Evel dileuriad eus Porzh Emren Naoned/Sant-Nazer ez on laouen da verkañ n'emañ ket porzh Naoned/Sant-Nazer, kentañ porzh Breizh, o kreskiñ diwar-goust ar re all, ha laouen da verzout n'eus ket da ren etrezomp ur c'hevrezh difrouezh met er c'hontroll da strivañ a-gevret evit ledanaat hor c'heinvro ("hinterland").

En em astenn a ra levezon armerzhel hor porzhioù war 17 departamant, da lavarout eo war Vreizh, un darn eus ar ranndir "Poitou-Charente", ar ranndir "Centre" ha traonienn al Liger. Ur c'heinvro eo gant 8 milion annezad pezh a rankfe degas un dreizhidell 5 milion tennell ouzhpenn (hep an tireoul).

Ledanoc'h eo ar geinvro-se e gwirionez ma talc'her kont eus ar morlinennoù nevez gant "car-ferries" o vont eus Rosgo ha Sant-Nazer. Mont a ra ar geinvro neuze ken pell ha Belgia hag Alamagn evit ar vorlinenn Sant-Nazer-Vigo, ha ken pell hag ar Pireneoù evit ar vorlinenn Rosgo-Plymouth.

Mar fell deomp kas an diorreadur-se war-raok, arabat deomp avat disañjal emañ ar porzhioù bras e Mor Breizh hag e Mor an Hanternoz o prientiñ un taol bras. Un arm kuzh a zo ganto, un arm a vo efedus-meurbet hep mar ebet : implij an elektronik en eskemmoù kenwerzhel. Anvet eo ivez kement-se ar "World Trade Centers" (Kreizennoù Kenwerzhel -Bed). En Europa emeur o sevel 5 W.T.C. er gwalarn : London, Amsterdam, Rotterdam, Antwerpen hag an Havr Nevez. Prest e vint e 1975/1976.

Gant an implij a raio ar porzhioù-se eus ar c'hreizennoù kenwerzhel etrevroadel-se e c'hell koazhañ pouez ar re all ma ne deuont ket a-benn da sevel frammoù heñvel.


Ma chomomp en entremar ha gant an doareoù kozh, petra a vo tu d'ober e gwirionez a-enep d'ar re (kenwerzhourien vras, paramantourien, greantelourien) a vo mestr war ar stlenn o tennañ d'an eskemmoù a-drugarez d'an elektronik ?

Ret eo demmp kilstourm buan : prest eo hor respont, e anv "EUROCEAN". Kinniget o deus ar porzhioù breizhat, dreist-holl Naoned/Sant-Nazer, An Oriant ha Brest, labourioù a-stroll evit prientiñ rakskeudenn ur "Maritime and Trade Center". "EUROCEAN" a zo e bal talvezout d'an Arvor Atlantel, eus La Rochelle da Sant-Malo.

Evit echuiñ ar brezegenn verr-mañ, e fellfe din hepken e chomfe en ho spered ar pevar mennoz-mañ :

- 1) E penn ar stourm emañ ar porzhioù breizhat war an Arvor Atlantel, ha ganto ez a an traoù buanoc'h abaoe daou vloaz eget er porzhioù gall;
- 2) Bresk eo ar berzh-se ma ne zeuomp ket a-benn da sevel en amzer-da-zont kement ha m'emañ o prientiñ ar porzhioù bras e Kornogeuropa : kreizennoù dastum ha dasparzhañ stlennadoù war an eskemmoù ;
- 3) Ouzhpenn se e c'heller lavarout ne denno hor porzhioù o mad eus o atoudoù nemet pa vo bet kaset da vat al labourioù isframmdur ret evit stagañ hor bro ouzh Kreizeuropa, da skouer "hent an aberoù" o vont eus Lille da Vayonne dre Roazhon ha Naoned, hent Arvor Atlantel-Kreizeuropa o vont eus aber al Liger da Helvetia, merdeüsted al Liger, h.a...
- 4) Ezhomm z'eus eus kenlabour pep hini evit dont a-benn. Arabat krediñ ez eo an eskemmoù afer an arbennigourien hepken, an dud a vor da skouer: kalz paramantourien a grog taolioù-arnod hep un diazez armerzhel sirius ha tonket int da c'hwitañ.

Ret eo dezho kenlabourat da skouer gant ar c'hambroù-kenwerzh ha greanterezh evit aozañ redoù kenwerzhel nevez, kinnig ar gwazadoù a zo ezhomm anezho evit degemer ijinerezhioù greantel nevez, digeriñ aerlinennoù nevez o klotañ gant ar morlinennoù, h.a...



PORZHIU PENNAÑ BREIZH

Ur riez kevandirel eo Frañs gant frammoù kozh a rank en em dreiñ
 mar fell dezhi c'hoari ur roll war ar morioù. Ra vo Breizh bemdez muioc'h
 broud ar c'halvidigezh nevez-se, a glot gant ezhommoù Europa.

Erwan HENAFF

NOTENNOU DIWAR-BENN

AN IMPALAOURIEZH

E-barzh niverenn diwezhañ "Imbourc'h" hon eus embannet ur pennad bet savet gant Per Penne diwar-benn keal an impalaouriezh. Kavout a ra deomp e ve da stagañ ouzh ar pennad-se un nebeut notennoù o devo da bal sklaeraat un tammig ar c'heal-mañ (pezh hon eus arnodet ober e arroud pe arroud eus an notennoù hon eus embannet ar miz diwezhañ). En dro-mañ avat e klaskimp resizañ arveziou zo eus an impalaouriezh ha n'eus ket bet taolet evezh a-walc'h outo gant darn marteze.

~~~~~

An arvez kentañ ha pennañ eus an impalaouriezh ha ne veneger ket nemeur - marteze dre maz eo anat - eo an arvez douaroniel ha kevandirel e par an hollved. Ne c'hell ur galloud politikel en hon amzer-ni dont da vezañ impalaour nemet perc'henne vefe d'un diriegezh divent gouest da bourchas dezhañ hep trubuilh ebet an danveziou krai pennañ he deus ur stad arnevez ezhomm anezho. Ne weler ket mat penaos e c'hellje ar Stadoù-Unanet pe an Unvaniezh-Soviedel ren ur politikerezh impalaerel gant un diriegezh a vefe ken dister hag hini ar Stad c'hall, lakaomp.

Ma vennfed da vat eta diskar ar galloudoù impalaerel e rankfed ivez dispenn ar Stadoù meur a seurt gant ar Stadoù-Unanet pe an Unvaniezh-Soviedel. Evit ar poent n'eus bet kavet stourmer enep-impalaerelour ebet evit goulenn an dispennadur-se. Moarvat ne gred hini ebet eus ar stourmerion-se ez eo gallus kement-se. Hogen penaos a-hend-all, koulskoude, diskar an impalaouriezh ?

Ensellomp bremañ un arvez all eus an impalaouriezh, bepred diouzh savboent ar re a stourm a-enep dezhi. Gwelomp adarre ivez ha gallus eo ar stourm-se oc'h heuliañ pennaennoù ar re a embann e fell dezho distrujañ ar walenn-se. Evidomp-ni ne soñj ket deomp nemeur en deus ar stourm-se ur ster er c'hendegouezh politikel a vremañ. Lavaromp bremañ perak.

An abeg pennañ eus hor c'hredenn eo ne c'heller stourm en un doare efedus a-enep d'un impalaouriezh nemet dre harpañ un impalaouriezh all; pe, c'hoazh, ne c'heller diskar un impalaeriezh nemet dre sevel unan all a-enep dezhi. Degouezh Sina hec'h unan a ro deomp ur brouenn eus pezh emamp o paouez

diskleriañ. A-benn talañ ouzh ar Stadoù-Unanet pe an Unvaniezh Soviedel he deus ranket Sina kenderc'hañ ar vombezenn atomel a zo arm diouti hec'h unan ar riezoù impalaerel. Bepred war an hevelep arbenn he deus ranket Sina astenn he beli war an diriegezh an ec'honañ ar gwellañ : alese sujedigezh Bro-Dibed pe gabestratur ar "broadelezhioù" war an harzoù : ar re-mañ n'o deus spi ebet da dapout frankiz na riegezh wirion ebet. Politikerezh diavaez Sina, a-hend-all, n'eo ket renet gant ar youl da virout pe da zaskoriñ o frankiz d'ar pobloù hogen da zifenn he lazoù stadel, ha kement-se, adarre, a zo merk-anaout an impalaouriezh (afer ar Pakistan en deus diskouezet, ma oa ezhomm, ne oa chalet Sinaiz nemet gant mad ar Stad sinaat).

Ouzhpennomp he deus an impalaouriezh ur vent istorel dre ret. Daoust dezhi bezañ awenet gant ar varksouriezh-leninouriezh - gouez dezhi - he deus Sina, da skouer, soñj eus he zremened impalaerel ha dre "hengoun" ivez he deus sujet ar pobloù a vev war hec'h harzoù. Un "hengoun" eo eta an impalaouriezh ha se a zo anatoc'h c'hoazh e degouezh Rusia a gendalc'h da ren, en diavaez, politikerezh an Dzared : ho pezet soñj eus destagidigezh ar broioù baltek h.a. Un hengoun seurt-se ne gaver ket avat en Indez ha rak-se ez eo disheñvel politikerezh diavaez Indez diouzh hini Rusia, da skouer.

N'eus ket a impalaouriezh kennebeut hep diorreadur armerzhel ha kalvezoniell en hon amzer. Hep an diorreadur-se ne servij da netra an diriegezh pe ar boblañs. Kemeromp adarre skouer Indez. Daoust da houmañ bezañ ledet penn-da-benn ur c'hevandir poblet gant 350.000.000 a annezidi e chom ar riez-se isdiorreet ha dre se ne c'hell kas war-raok politikerezh impalaerel ebet. Pezh a vir ouzh Sina a vezañ ur galloud impalaerel penn-da-benn, n'eo ket he mennadoù mat pe he glanded politikel hogen skoilh un isdiorreadur ijinerezhel zo. Disheñvel e vefe emichañs politikerezh Sina ma teufe da biaouañ ur galloud armerzhel ha kalvezoniell par da hini Japan. (homañ avat he deus ranket dilezel hec'h impalaouriezh abaoe m'he deus ranket diskregiñ diouzh an tachennoù bet aloubet ganti war-dro ar bloavezhioù tregont Dibaot a wech e c'hell ur riez embreger un impalaouriezh klok.)

=====

Distroomp avat bremañ d'ar c'hraf hon eus damveneget uheloc'h hag a zo ster ar stourm enep-impalaerel e meizframm ar re a ra anezhañ o danvez brudañ pennañ hag a zo, peurvuiañ, marksourion. Daoust hag ur ster a c'hell kaout ar stourm-se diouzh o reizh soñjal-int zoken ? E gwirionez ne gredomp ket nemeur adarre. Lavaret hon eus uheloc'h ned eo bet ar stourm enep-impalaerel betek henn nemet stourm un impalaeriezh a-enep d'un impalaeriezh all, e degouezh ar varksourion nemet stourm un impalaeriezh "sokialour" a-enep d'un impalaeriezh "kevalaour". Ar P.C.F. ha strolladoù an Trede Etrevroadelenn, dre vras, a laka o goanag e Rusia ; ar vaourion, e Sina h.a. Trec'h un impalaouriezh sokialour avat ne rafe nemet astenn impalaouriezh

houmañ war an hollved a-bezh hag herrekaat dre se end-eeun tolpadur ar c'hevalaoù - stadel, ne vern ket - en ur Riez hepken a reolfe d'ar mare-se an hollved penn-da-benn (seurt unvanidigezh eus an hollved a zo unan eus gwengeloù ar varksourion). E berr gomzoù, an tu nemetañ da zistrujañ an impalaouriezh a zo, a-benn ar fin, diazezañ un impalaeriezh sokialour penn-da-benn d'an douar. Moarvat e roer da glevout e tizerio ar Stad adal mare-se peogwir ne vo mui kenstok ebet etre Stadoù end-eeun hogen kement-se, ret eo lavarout, a zo diaes da faltaziañ, un tammig evel baradoz ar gristenion.

Ma n'en deus ar stourm enep-impalaerel nemeur a ster e damkaniezh ar varksourion peogwir e tisoc'h en diwezh da groudigezh ur galloud impalaerel hollvedel e c'heller gwiriañ evelkent - ha kement-se a zo frealzus a-walc'h goude holl - ez eus e devoud ken bras eneberezhioù etre ar galloudoù impalaerelour liesseurt ma teu galloudoù politikel hag armerzhel dister a-walc'h, dezho da vihanañ avat ur riegezh dre anv, a-benn da virout un tamm frankiz bennak ha da herzel ouzh mac'homerezh an impalaeriezhoù. Brezel an tireoul, nevez zo, en deus henn diskouezet splann, - ha war an darvoud-se e tistroimp diwezhatoc'h. Ar c'hempouez diazezet diwar vremañ etre U.R.S.S. hag U.S.A. pe Europa ar C'hornog eo en deus graet nerzh ar riezoù arabek, da skouer. En abeg d'ar c'hevezerezh etre ar galloudoù impalaerel pennañ ez eo gouest Arabiz zoken da lakaat da blegañ galloudoù a zo trec'h dezho, hag a-bell (1).

Hogen ur gentel all a zo da dennañ diouzh darvoudoù ar mizioù tremenet : ne c'hoari ar gevarzhelezh etreproleterel roll ebet er stourm enep-impalaerel. E broioù diorreet ar C'hornog - ken er Stadoù-Unanet ken en Europa - en em vata al labourerion eus ur rez-bevañ a zo kalz dreist da hini ar pep brasañ eus poblañs broioù isdiorreet an Trede Bed. Kevampleget eo ar rez-bevañ-se avat ouzh korvoidigezh an Trede Bed gant ar galloudoù impalaerel kornogat. Ma klask eta broioù en Trede Bed kreskiñ o rez-bevañ-int diwar goust ar broioù impalaerel e vo tonket dezho krennañ da gentañ rez-bevañ ar renkadoù gwerinel er broioù-se. Dre se end-eeun en em gavo kevarzhet e devoud bourc'hiziezh ha proleteriezh er broioù diorreet. Disoc'hañ a ray seurt argerzhad, avat, ent natur, da vroudañ ar faskouriezh e broioù ar C'hornog dre lakaat anat d'ar werin er broioù kornogat ez eo kevarzhet he lazoù kalz muioc'h ouzh re ar vourc'hiziezh vroadel en hevelep broioù

---

(1) E kement-se avat ez anad unan eus arveziou diboell ar politikerezh a vremañ hag a denn da implij hollek ar sponterezh. Ken kemplezh ez eo ar gevredigezh kornogat arnevez ma c'hell korrstrolloù zo kinnig he diskar war-bouez seizañ rodoù zo eus hec'h ardivink armerzhel.

eget ouzh re boblañsoù isdiorreet an Trede Bed. Renet evel-se eta e tibouf ar stourm enep-impalaerel, ent emgefreek, war un dislavar peogwir ez a a-enep d'ar pal a fellfe dezhañ tizhout: o tevoudañ ar faskouriezh e kreñvafe an impalaouriezh.

E par ar bloc'hoù kevandirel zoken e c'hoari ivez an hevelep kevarzhelezh devoudel etre brobennoù ar c'hreizparzh ha broioù ar beskelloù en trobarzh, amziorreet pe nebeutoc'h diorreet, o tennañ ampled avat tamm pe damm evelkent, e stumm pe stumm, eus korvodur an Trede Bed dre maz eo enframmet o armerzh en armerzh ar broioù a zo kiriek d'ar c'horvodur-se. Evel m'hon eus merket en niverenn diwezhañ eus IMBOURC'H emañ enframmet Breizh e Kornog Europa ha dleour eo Breizhiz evit o rez-bevañ - a zo kalz dreist da hini Arabiz, se a rankomp adlavarout - da c'halloud impalaerel Bro-C'hall hag ar riezoù impalaerel europat all pe e ve diazezet an impalaerelouriezh anezho war ar politikerezh hag al lu pe war an armerzh e unan. Ne c'hellfe Breizhiz harpañ ar stourm enep-impalaerel nemet oc'h asantiñ i ivez da grennañ o rez-bevañ. Se a c'hellfent ober o tec'hout diouzh pennaennoù an armerzh hogen hervez an damkanourion varksat es eo an armerzh isframm ne vern peseurt politikerezh ; se zo lavarout n'o deus ar mennadoù mat buhezel pe speredel perzh ebet da gemer ennañ.

Diouzh pezh hon eus displeget betek bremañ e c'heller merzout pegen faziak ha diboell eo ar stourm enep-implaerel evel m'eo meizet gant an darn-vuiañ eus ar re a ra anezhañ o lugan kentañ. Ne c'hellfe ar pleustrerezh a empennont kaout ur ster nemet o c'houlakaat emañ erru an holl vroioù en hevelep pazenn eus an diorreerezh armerzhel, pezh n'eo ket gwir nag evit ar broioù o unan - splann a-walc'h eo - nag evit pep renkad a ya d'ober kevredigezh pep hini eus ar broioù-se. Sklaer eo, er c'hontrol, n'eus keñver ebet, er bed kornogat zoken, etre ar gwerinour portugalat pe aljeriat a zivro da Alamagn evit gounit e damm greun ha magañ e diegezhchomet er gêr hag o vervel hgozik gant an naon hag ar micherour alaman e unan, alies perc'henn un ti hag ur c'harr-tan h.a. Heñvel eo ar gont gant ar bourc'hiziezhoù o unan a vez o kevezañ kenetrezo eus ur vroad d'eben hag a rank stourm evit gellout seveniñ en o broadoù ketep ar gefridi istorel o deus sevenet e pep bro peurvuiañ hag a zo krouiñ ur greanterezh broadel war-bouez enebañ diouzh ret ouzh bourc'hiziezh ar broioù trevadenner mac'hom hag impalaerelour. Kement-se a verkomp evit kounañ - pezh a vez nac'het gant kalz - o deus ar bourc'hiziezhoù broadel (lakaet hor bize unan e Breizh, pezh n'eo ket anat rak ar vourc'hiziezh e Breizh n'eo ket betek henn ur vourc'hiziezh vroadel) ur roll a-bouez da c'hoari er stourm enep-impalaerel. Moarvat e rankor erlec'hiañ ouzh an danvez renkad ren armerzhel -se ur renkad-ren politikel nevez a zerc'houezo war-eeun ar werin hogen difur e vefe a-grenn a-berzh stourmerion vrezhon diskar un egin a vourc'hiziezh vrezhon kent n'he dije gellet kefleuniañ ar garg a zo miret dezhi er sevenadur ma vevomp ennañ evit ar poent.

Erfin, lezel a reer a-gostez un arvez a-bouez eus an impalaouriezh hag a zo al liesdereziegezh anezhi. O vezañ m'en em lec'hier bepred e par an hollved e verzer an impalaouriezh etre bloc'hoù nemetken. Padal, e diabarzh ar bloc'hoù o unan e ra o reuz darempredoù a vestroniadur eus ur riez d'eben. Er ranndir kornogat ez embreg ar Stadoù-Unanet ul levezon impalaerel war bep hini eus broadoù Europa ar C'hornog (lakaomp war dachenn an urzhiataerezed, ar stlennataerezh, an derc'hanijinerezh h.a.) E diabarzh Europa hec'h unan e piau riezoù zo ur renk dreist da hini ar re all en arbenn eus o lu pe o armerzh (Bro-C'hall ha Bro-Alamagn, da skouer, e-keñver Italia pe stadoù disteroc'h c'hoazh o fouez e framm ar C.E.E. Izelvroioù h.a.) Ha kalz gwashoc'h eo c'hoazh ar galloud impalaerel-se e-keñver ar broioù bet damesaet, destaget ha trevadennet gant Bro-C'hall e diabarzh hec'h harzoù hag e-keñver Breizh drès. E ser Breizh a-hend-all e tizoloimp ur vent all eus an impalaouriezh ; n'eo ket armerzhel hepken, evel ma klasker hol lakaat da grediñ ; sevenadurel eo ivez, embreget war-eeun gant ar Stad. Ha koulskoude, war un dro ha daoust da se, ne c'heller ket nac'hañ o deus Breizhiz evel Kornogiz, e par an armerzh hag ar rez-bevañ, perzh en impalaouriezh a zo embreget gant ar C'hornog dre vras diwar goust broadoù an Trede Bed.

Kement-se, moarvat, en ur stumm, a zo empleg e natur an traoù rak er sevenadur arnevez, greantel hag ijinerezhel, armerzhel ha yoc'hel, ne c'hell na Breizh na Bro-C'hall bezañ dizalc'h a-grenn. Dre ret eta ez eus darempredoù a gevamzalc'hted etre ar broioù. Diskiant e vefe, bepred e degouezh ur sevenadur ijinerezhel ledet penn-da-benn da gevandirioù en o fezh, klask diazezañ un armerzh emvastus hag emvevezus e Breizh. Houarn a zo e Breizh. Betek gwelout ne dalvez ket ar boan, er sevenadur m'en em gaver ennañ, krouiñ un houarnouriezh vrezhon ur wech savet ur Stad vrezhon, lakaomp, evit diogeliñ, sañset, hon dishualded. Dav e vo da Vreizh kavout he lec'h en armerzh Europa dre vras ; al lec'h-se a zlefe dibab diwar un emglev skoulmet dre gaer gant ar riezoù a zo e penn an armerzh er c'hevandir-mañ. Gouzout a reer a-hend-all he deus klasket an Unvaniezh soviedel, en hevelep doare, kenurzhañ armerzh broioù Reter Europa dre ar "C'homecon".

Anzavomp eta ez eo didec'hus un dasparzhadur zo eus al labour hag ar c'henderc'h er broioù diorreet. Ar pezh n'eo ket reizh avat eo e ve divizet an dasparzhadur-se gant ur galloud impalaerel hepken ; ha setu dres pezh a c'hoarvez e reter Europa mestroniet gant al lu rusian a emell diouzh ret en aferioù diabarzh ar broioù sokialour all er ranndir-se evel e 1956 pe e 1968, en Hungaria hag e Tcheko-Slovakia. Er c'hontrol, n'eus forzh peseurt broad, pegen paourhag isdiorreet bennak e ve, gant ma ne voket reolet war-eeun gant galloud milourel ur riez impalaerel bennak a c'hell en em zifenn un tamm



bennak evelkent.

N'on ket a-du gant ar broadoù arabek pa fell dezho diverkañ ar vroad israhelat a zivar c'horre an douar hogen anaoudek on outo evelkent evit bezañ diskouezet e ser darvoudoù ar mizvezhioù diwezhañ e c'hell n'eus forzh peseurt broad, bihan ha dister, dezhi avat skiant eus he dellid, trec'hiñ bepred an impalaouriezh pa gar. N'o deus gellet ober avat nemet peogwir e piaouent ar frankiz politikel, da vihanañ. Da bep pobl eta tizhout, da gentañ, ur frankiz politikel klok ma fell dezhi a-c'houdevezh ren ur stourm efedusoc'h a-enep d'an impalaouriezh hag an nevez-trevadennerzh armerzhel. Bez ez eo an dishualded eta kentañ ampleg diazezadur darempredoù a gevarzhelezh hag a gevamzalc'h d'etre ar broioù.

Gwir eo ne vo ket kevatal nepred ar c'heñverioù a nerzh a c'houstenn an darempredoù etrevroadel. Hogen adlavarout a reomp n'eus tu ebet da gemm ar saviad-se er sevenadur arnevez degemeret ganeomp, Breizhiz, betek hiziv. Ma fellfe da Vreizhiz tec'hout penn-da-benn diouzh pep impalaouriezh e rankfent distreiñ d'un doare sevenadur gladdalc'hel ha plouezat a seurt gant hini ar grennamzer. Edon o vont da lavarout e tlefent kemer skouer diwar gumunioù poblek Sina (c'hwi ' oar : an teuzerezhioù-houarn da-zougen e pep parrez h.a.) nemet, eveljust, o nac'hañ ar galloud luel ha kerreizhel a zalc'h ar c'humunioù-se en o sav er vro-hont moarvat (gant ar Vombezenn e barr-uhelañ ar galloud stadel). Nevez zo ivez e lennen war ur gazetenn ur pennadig diwar-benn an "Ti Emren" (hag emvastus moarvat) a vefe tommet gant gwrez an heol, a dennfe an aezhenn-leskiñ eus teil ha kac'hajoù an dud hag al loened, an tredan eus ur vilin-avel, an dour eus ur puñs, ar gremm da lakaat ar c'hirri da vale eus ar glaou-koad (gant ur "gazojen", na petra ; eveljust, d'ar c'houlz-se, e tlefe ur c'harr padout keit ha buhez un den, evel e zilhad gwechall, a-hervez...) ; n'o defe an dud ivez neuze nemet boued "bevoniel" mat da zebriñ hag an amvevad a chomfe glan meurbet emichañs. Gwelout a rit emaomp erruet en "Enez ar Vertuz", da lavarout eo, en Utopia hogen ma c'hell an dud degouezhout en Utopia da heul un drouziwezh bennak evel m'eo bet diskar an Impalaeriezh roman pemzek kant vloaz zo ne gav ket din ez int gouest d'he dibab a youl gaer ; daoust dezho eo ez eo bet ar Vrezhoned dieubet diouzh yev ar Romaned pemzek kant vloaz zo end-eeun.

Ma fell deomp avat tizhout ur barr-kenderc'hañ yoc'hel hag ijinerezhel, hep mar ebet hor bo ezhomm eus danvezioù krai ha danvezioù gremm tennet eus an douar a-bezh ha, war un dro, e rankimp arverañ an ardivinkelezh hag an emgefreelezh evit yoc'helaat muioc'h-mui ar c'henderc'h. Kement-se a zo lavarout ivez en deus ezhomm ar sevenadur arnevez muioc'h-mui eus an traoù hag an ardivinkoù ha

nebeutoc'h-nebeutañ eus an dud o unan, nemet evel  
bevezerion evitaotren d'ar wikefre kenderc'hel da dreiñ  
ingal rak bez ez eo hor sevenadur arnevez ur reizhiad  
kloz ha n'he deus reizhabeg ebet nemet enni hec'h unan,  
evel Doue m'hoc'h eus c'hoant. E gwirionez e c'hell mistri  
ar bed warc'hoazh - pe sokialourion pe gevalaourion e vent -  
divizout un deiz bennak krennañ an diorreadur war ul live  
zo hag ober eus an armerzh hollvedel - uhelañ pazenn an  
impalaouriezh - ar reizhiad kloz ha sonnet a venegen  
bremaik, a vije gouest da beurbadout da viken hep doujañ  
nepred enkadenn ebet, e-lec'h e vefe kevreolet poblañs ha  
kenderc'h en ur c'hempouez rik : setu dres testenn lodenn  
gentañ "Enez ar Vertuz". Ha diouzh ar sellboent-se e c'heller  
didamall ha reizhabegañ pleustrezh an hilastaliñ yoc'hel  
a zo erbedet gant an Amerikaned en Indez, da skouer.

En ur seurt reizhiad kloz, gwarezet diouzh pep  
enkadenn, evel ma verken dres, ne vefe ezhomm nag eus Indeziz  
Indez, nag eus morianed Afrika, nag eus Indianed Amazonia,  
da skouer ; skarzhet e c'hellfe bezañ an holl boblañsoù-se  
hep ober an disterañ gaou ouzh an armerzh yoc'hel hollvedel.  
E devoud, en ur seurt reizhiad ne vefe ket ezhomm eus Breizhiz  
evel Breizhiz nag eus broad ebet evel broad, o vezañ ma vefe  
urzhiet an hollved a-bezh e sell d'ar c'henderc'hañ-beveziñ.

Lod a zo prest da soñjal e rofe ar "sokialouriezh"  
- evel m'eo bet empennet abaoe ma ren an impalaerelouriezh  
speredel varksat - an tu da dec'hout diouzh hevelep gwallziwezh.  
Ne soñj ket deomp nemeur. Diouzh maz eo ar sokialouriezh  
europat abaoe kant vloaz bennak awenet gant ar varksouriezh a  
ra eus mestroniadur hag unvanadur an hollved dre <sup>hec'h uhelvennad</sup> an ijinerezh  
e klot ent pleustrek gant pleustrezh an unwerzhouriezhoù  
hag a zo dres o prientiñ an hent d'ar sokialouriezh, hervez  
ar varksourion o unan. Hag e gwirionez ma ned eo roll ha finvezh  
mab-den er bed nemet mestroniañ hag unvaniñ an hollved ne weler  
ket mat penaos e c'hellfe hepkoriñ pazenn an impalaouriezh  
war an hent a gas da unvanadur an hollved.

H. Kervevan

\*\*\*\*\*

GERIAOUEG. Impalaerel/impérialiste (e devoud). Impalaerelour/id.  
(a vennad). Ar ger "impérial" e galleg a vo troet peurvuiañ gant  
ur renadenn-anv. "Couronne impériale" = "kurunenn an impalaeriezh"  
MEIZFRAMM/ensemble de concepts. TOLPADUR/accumulation. KEVARZHELEZH/  
solidarité. KEVARZHAÑ/rendre solidaire. KEVAMPLEGANÑ/conditionner.  
EMGEFREEK/automatique. PLEUSTREK/pratique. DEVOUD/fait. BESKELLOU, TROBARZH/péri-  
phérie. KETEP/respectif. URZHIATAEREZ/ordinateur. STLENNATAEREZH/informatique.  
DERC'HANIJINEREZH/industrie nucléaire. KEVAMZALC'HTED/interdépendance. EMVASTUS/  
autarcique. EMVEVEZUS/d'autoconsommation. EMELLOUT/intervenir. MILOUREL, LUEL/  
militaire. AMPLEG/condition. HILASTALIÑ/contraception. GOUSTENNAÑ/sous-tendre.  
GREMM/énergie. KRAI(danvez)/matière première. AMVEVAD/environnement. YOC'HEL/  
de masse. HEPKORIÑ/se passer de. EMGEFREELEZH/automaticité. KERREIZHEL/policier.

A N E M S A V H A G A R S P O N T E R E Z H

(1) - ARAOK AN EIL BREZEL-BED

E-pad an noz eus ar 6 d'ar 7 a viz eost 1932, da 4 eur eus ar beure, e strakas ur vombezenn vras e Roazhon o tiskar delwenn ar "Vezh Broadel", da lavarout eo delwenn an Unaniezh etre Breizh ha Bro-C'hall, kizellet gant Jean BOUCHER ha diazezet d'an 29 a viz here 1912 ouzh moger an ti-kêr.

Enklask ar bolis a ziskouezas e oa bet implijet cheddit met ne voe ket evit dizoleiñ aozerion ar gwall-daol-se. D'ar 7 a viz eost avat, e voe kaset d'ar c'helaouennoù ur c'hemennadur e galleg sinet "Gwenn-ha-Du":

"Emañ ar C'hallaoued o lidañ hiziv pevar c'hantvet deiz-ha-bloaz o zrec'h ha stagidigezh Breizh. Ni, Breizhiz bepred, disuj daoust da bevar c'hantved ac'hubidigezh c'hall, hon eus divizet adlakaat e daouarn ar Vrezhoned tonkad o mamm-vro, evit brasañ mad ar vroad vrezhon. Digeriñ a reomp ar stourm evit dieubidigezh hor bro en deiz-mañ, deiz-ha-bloaz hor stagidigezh, dre ziskar arouez hor servelezh, a zo savet e-kreiz hor c'hêrbenn."

Dre urzh,

Gwenn ha Du.

War an hevelep deiz, edo an Ao. HERRIOT, rener ar gouarnamant gall neuze, o lidañ e Gwened an deiz-ha-bloaz-se. Betek neuze e chome dianav an Emsav en diavaez met gant bombezenn Roazhon e voe graet un trouz bras en-dro dezhañ er c'helaouennoù e Breizh, e Paris, en Europa ha zoken er Stadoù-Unanet. Evit ar wech kentañ moarvat e teue an Emsav da gaout ur brud ken bras.

Livet e voe Breizh er c'helaouennoù evel ur vro nes a-walc'h da Iwerzhon. Tost-tre e chome c'hoazh kudenn Iwerzhon : Emsavadeg Pask 1916, brezel-diabarzh 1921-1922... Gant ur romantelezh iskis e voe kinniget an Emsav e meur a gelaouenn, hag int o livañ istorioù kevredigezhioù kuzh, evel ar "Vreudeur Vrezhon", enno 8 000 den (!!!) prest d'en em sevel, ur feur-emglev kuzh gant broadelourion Iwerzhon skoulmet e Pontrev, ur gevredigezh kuzh all, an "Dorn Du", ur "Werc'hez Ruz", kestell kevrinus hag ur bern sotonioù all c'hoazh (1)...

---

(1) Daou-ugent vloaz war lerc'h, n'eo ket siriusoc'h ar c'helaouennoù gall en o fennadoù diwar-benn an Emsav. E miz gwengolo 1972, d'ar mare ma oa barnet e Paris paotred an F.L.B., e tisplege ur c'helaouenner eus France-Soir, ent sirius-tre e oa gant ar vroadelourion vrezhon armoù niverus o tont eus Libia, dre hanterouriezh E.T.A. hag an I.R.A.(!!!!?????)

Evit ar C'hallaoued e oa bet Breizh betek ar mare-se, mamm-vro BECASSINE, bro ar c'hrapouez, an dantelezh, ar c'hoefoù bigouden, bro Théodore BOTREL, bro an istorioù iskis danevellet gant Anatole Le BRAZ, ur vro taolennet alies ivez e levrioù Pierre LOTI... E-pad un nebeut sizhunvezhioù e voe kinniget dezho ur skeudenn disheñvel-tre eus hor bro, hag a oa siwazh, ken faos hag ar skeudenn gentañ. Ne oa ket Breizhiz warnes en em sevel c'hoazh, pell a se !

Daoust da strivoù bras ar bolis ha da furchadennoù diniver dre Vreizh a-bezh eus ar Groazig da Vrest, e burevioù 'Breiz Atao', e tiez rannvroelerien'zo, ne voe kavet netra. Paket e voe c'hwec'h den yaouank, izili eus ar stroll 'Breiz da zont' renet gant Teo JEUSSET ha bac'het e-pad 52 zevezh ! Met divac'het e voent goude dre ma ne oa ket tu da brouiñ un dra bennak a-enep dezho.

E-pad ar mare-se edo ar bolis o furchal e pep lec'h hag o welout roud 'Gwenn-ha-du' e pep lec'h ivez. Skrivañ a reas Jakez RIOU d'ar mare-se e bezh-c'hoari goapañs "An Dogan". Eveshaet e voe an holl ouelioù breizhek e-pad an hañv.

Evit gwir ne oa ket Breizhiz evit bezañ a-du pe a-enep da vombezenn Roazhon. Ne ouient ket petra a oa 'Breiz Atao', petra a felle d'al luskadig-se, hogen pa zivizas ar gelaouenn Quest-Eclair dastum arc'hant evit adsevel ar monumant, ne zegemeras gwenneg ebet koulz lavaret digant he lennerion.

E miz du e fellas d'ar gouarnamant gall lidañ adarre an deiz-ha-bloaz-se, e Naoned ar wech-mañ. Mont a reas an Ao. HERRIOT da Vreizh en-dro e sell da zizoleiñ ur blakenn-eñvor e marbr dindan brenestroù ar gambr ma voe ganet enni ANNA VREIZH (!?!). D'an 19 a viz du eta, da 23 eur, e loc'has Edouard HERRIOT eus ti-hent-houarn Orsay e Paris gant un tren a-ziforc'h met erruout a reas e Naoned gant 50 munutenn dale, hag an holl bersonelezhioù d'e c'hortoz e-pad an amzer-se e ti-hent-houarn Naoned ! Da bemp eur eus ar beure o doa tarzhet div vombezenn er c'hilometr 273 e-kichen Ingrandes, war harzoù Breizh. Troc'het e oa an hent-houarn met lezet e oa bet div c'houlouenn ruz e-kichen evit mirout ouzh ur gwallzarvoud. Daoust da se e reas van HERRIOT da grediñ e oa bet klasket e lazhañ.

D'an 20 e voe kaset eus Paris dre ar post ar c'hemennadur nevez-mañ d'ar c'helaouennoù :

"D'an 20 a viz du 1932. Dont a ra da Naoned penn ar gouarnamant gall da lidañ un eil gwech pevar c'hantvet deiz-ha-bloaz hor stagidigezh. Mennet da reiñ ur respont d'an taol-dismegañs-se, hon eus divizet diskouez adarre hor youl vroadel dre droc'hañ an hent-houarn, ma tle dont drezañ, dres war harzoù Breizh. Graet e vo an taol-se en ur gemer an holl ziarbennoù boaz war an houarnhentoù evit bezañ divar ne c'hello ket c'hoarvezout ur gwallzarvoud. Prouiñ a raio ar jestr-se, dinoaz a-youl-gaer, d'ar renerien c'hall ez eo mennet ar Vrezhoned da chom hep bezañ kunujennet ent digastiz ken en o bro ; ha kement adfeilh nevez a c'hellfe mat lakaat

o fersonelezhioù en un arvar gwirion ar wech-se. Deuet mat e vint hepken d'an deiz ma teuint da reif en-dro d'ar vroad vrezhon ar frankiz he deus ar gwir da gaout."

D'an 21 a viz du 1932 e tegemeras rener ar gouarnamant un dileuriadur a gannaded breizhat, LORGÈRE, CADORET, DANIELOU, MAZE ha PERROT, deuet d'e gaout evit ezteurel o distaoladur eus ar gwalldaol nevez-se. Harzet e voe gant ar bolis daou Vreizhad e Paris, unan anezho un ijinour yaouank hag egile un implijad-bank met ne voe ket tu da gavout ur brouenn bennak a-enep dezho ha lezet e voent da vont diwezhatoc'h. Da heul an istor-se, ne gredas ket ar vaodierned dont da Vreizh ken e-pad un nebeut mizvezhioù. Ha sioul e chomas 'Gwenn-ha-du' e-pad tri bloaz.

D'ar 15 a viz c'hwevrer 1936 e voe anv adarre eus an aozadur kuzh-se. E miz genver 1934 e voe diazezet ul luskad evit goulenn kelennadurezh ar brezhoneg er skolioù, da heul ar goulenn graet gant kuzul-kêr Gwerleskin. Nebeut-ha-nebeut en em ledas al luskad-se, e anv "Ar brezoneg er skol". E dibenn 1934 e oa bet degemeret dija ar mennad gant 27 kuzul-kêr hag e 1936, da zerc'hent an dilennadegoù hollel, gant 207 kuzul-kêr ! Kas a reas 'Gwenn-ha-du' ur goulenn-disentezh groñs d'ar 15 a viz c'hwevrer 1936 evit goulenn start, digant maodiern gall an deskadurezh, kelennadurezh ar brezhoneg er skolioù (a oa bet goulennet dija d'an ampoent-se gant 120 kuzul-kêr ha 3 c'huzul-departamant). Root e voe un dale eus ur miz d'ar maodiern. Ne oa ket hemañ evit plegañ evel-just.

E-pad an noz eus an 13 d'ar 14 a viz ebrel 1936 (evit ugentvet deiz-ha-bloaz Pask 1916) e voe taolet boutailhoù tangwallus (enno fosfor gwenn ha sulfur karbon) ouzh prefedioù Roazhon, Sant-Brieg, Kemper ha Naoned. Degemer a reas ar c'helaouennoù d'ar 14 ul lizher digant 'Gwenn-ha-du' o tisplegañ abegoù ar gwall-daolioù-se.

Harzet e voe Célestin LAINE - Neven HENAFF -, m'he devoa ar bolis diskred outañ, ha broadelourion all gantañ, met n'hellas prouañ netra a-enep dezhañ ha lezet e voe da vont. E 1937 e tlee sevel Célestin LAINE ur bagad damsoudardel, "Kadervenn", a yelas d'en embregañ e Menez Arre.

E-pad daou vloaz adarre ne voe ket klevet ken strakadennoù bombezennoù e Breizh met goloet e voe mogerioù Roazhon ha kêrioù all gant enskrivadurioù ha luganoù a-enpp d'ar C'hallaoued : "Breiz d'ar Vreiziz !", "Bro-C'hall d'ar C'hallaoued !", "Breiz Atao a vo trec'h !" hag all... D'ar 16 a viz mae 1938 e voe harzet un toullad mat a emsaverien gant ar bolis c'hall : LAINE, A.GEFFROY, COUERE, GERVAIS, CASTERET, CAOUISSIN, PERES ha Le LANDAIS, e Roazhon hag e Sant-Brieg. Difeskinet e voe LAINE gant an archerien met ne dennjont ket kalz tra dioutañ.

Diwezhatoc'h, e miz mae 1938, e teuas ar prezidant Albert LEBRUN da Sant-Brieg met dre aon rak ur gwalldaol e voe kaset d'ar geoded-se 5 000 soudard hag ur bern poliserien. Gourc'hemennet e voe da Frañsez VALLEE, 78 bloaz dezhañ, chom en e di. E-pad 24 eurvezh e voe difennet d'an nijerezed tremen a-us d'an departamant. Harzet e voe ar vorlinenn Jerzenez-Sant-Malo hag a-hed an hent-houarn, eus Paris da Sant-Brieg, e voe lakaet soudarded, unan pep kant metrad !

D'an 25 a viz mae 1938, e voe embannet gant DALADIER un devez (dekred), a oa bet nac'het an destenn anezhañ gant ar parlamant e miz gouere 1928, pa oa bet kinniget evel danvez-lezenn. An devez-se a rae (hag a ra c'hoazh hiziv) un torfed eus eztaoladur ur mennoz emrenelour hepken :

"Kement hini en devo klasket, dre forzh petore hentenn, lakaat en arvar anterinder an diriegezh vroadel pe dennañ diouzh beli Bro-C'hall un darn eus an diriegezh e-lec'h m'emañ ar veli-se o ren, a vo kastizet gant ur vac'hidigezh a c'hell padout etre ur bloavezh ha pemp bloavezh."

D'an 22 a vezheven 1938, e voe barnet emsaverien evit ar wech kentañ abaoe an devez-se. Nac'h a reas LAINE komz galleg ha d'ar jubennour e lavaras hepken : "N'em eus netra da lavarout !". Kondaonet e voe an emsaverien da 2 vizvezh bac'hidigezh, nemet LAINE da 4 mizvezh.

D'an 18 a viz kerzu 1938, da 4 eur 20 eus ar beure, e voe diskaret gant ur vombezenn "delwenn ar c'hevredad" savet e Pontivi evit kounaat kejadenn ar soudarded breizhat hag anjovat e 1792 p'eo devoe lavaret : "N'eus ket mui a Vrezhoned nag a Anjoviz". Kas a reas 'Gwenn-ha-du' ur c'hemennadur d'ar c'helaouennoù evit displegañ e oa an delwenn-se ur "gunujenn hollbadus d'ar Vroad Vrezhon, dre ma lavare ne oa ket mui a Vrezhoned diwar-vremañ" hag ur respont e oa ivez ar vombezenn-se d'an 22 vizvezh bac'hidigezh roet da 9 broadelour (barnet e oa bet ivez DEBAUVAIS d'ar 4 a viz du 1938 gant lez-varn Roazhon ha kondaonet da 4 mizvezh bac'hidigezh).

Engalv a reas ar vroadelourien met ne voe ket kommet o c'hastizoù gant al lez-varn nevez d'ar 15 a viz c'hwevrer 1939. Evit respont e lakaas 'Gwenn-ha-du' ur vombezenn nevez da darzhañ e prefeddi Kemper hag houmañ d'ober kalz reuz. Kinnig a reas ar prefeddi ur gopr 5 000 F da gement hini a zegasfe stlennadoù met ne zegemeras stlennad ebet.

Gant an taol diwezhañ-se ez echuas koulz lavaret istor 'Gwenn-ha-du' rak en hevelep bloaz e tarzhas an eil brezel-bed ha ret e voe d'an emsaverien stourm gant hentenoù all.

Bihan-tre e voe e gwirionez niver ar gwalldaolioù sevenet gant 'Gwenn-ha-du' met pa ouzer pegen bihan e oa niver e izili e chomer estlammet dirak ar brud a reas an aozadur kuzh-se. Dibabet mat-kenañ e voe pep gwech ar gwenoù. Bugelel e c'hell seblantout troc'hañ ul linenn hent-houarn pe c'hourc'hemenn d'ur maodiern lakaat ar brezhoneg da vezañ kelennet er skolioù, met n'o doa an taolioù-se nemet un dalvoudegezh arouezel. An trouz graet er skingomz hag er c'helaouennoù da heul un darzhadenn a rae kalz muioc'h a vruderezh evit ar mennozioù broadel eget n'en dije gallet ober an Emsav gant hentenoù lezennel rik.

Ret eo sellout ouzh Gwenn-ha-Du eta evel un aozadur-brudañ ha tamm ebet evel un aozadur-dieubiñ pe un nerzh dansoudardel evel ma leze da gredañ en e gemennadurioù. Gant 'Gwenn-ha-du' ne voe lazhiad na gloaziad ebet ha moarvat, ma ne vije ket bet eus darvoudoù ar brezel, o dije dalc'het an darn vrasañ eus ar Vrezhoned, ur soñj plijet eus obererezhioù

'Gwenn-ha-du'.

Diskouez a ra istor an aozadur-se penaos e c'hell un dornadig tud kalonek ha frammet-mat degas d'ur mennoz politikel evel mennoziou an Emsav brezhon kalz brud, hep kaout ur bern gwenn-eien evit se. Met talvezout a reas obererezh Gwenn-ha-Du dre na oa un aozadur politikel o labourat ent digor e Breizh hag a c'hellas ober e vad eus ar bruderezh-se. Ma vije bet goull a-grenn al leurenn bolitikel vrezhon, n'o dije ket talvezet bombezennoù 'Gwenn-ha-du' da galz tra.

---

DA GENDERC'HEL : "AN EMSAV HAG AR SPONTEREZH GOUDE AR BREZEL"

---

KELAOUENNOU DEGEMERET

POBL VREIZ. Niverenn 47. Deuet eo er-maez niverenn dibenn bloaz "POBL VREIZ, kelaouenn Unvaniez demokratel Breiz" POBL VREIZ a zo dreist-holl ur gazetenn hogen evel kazetenn ez eo aozet mat ha kavout a ra deomp e vo deuet mat d'al lennerion a glask pennadoù aes da lenn. Er c'heñver-se e talc'h un tammig lec'h ARVOR gwechall. Liesseurt eo ar pennadoù ha skeudennaouet mat ez int ivez. L Koumanant: 6 lur. B.P. 29 273 BREST Cedex. KRP 2746-79 Roazhon.

AR FALZ. Supplément à SKOL VREIZ. Nouvelle Série N°2-3. Deuet eo ar FALZ da vezañ un ur gelaouenn a studi e galleg dreist-holl, gant ur pennad bennak e brezhoneg. Diskouezet ha kempennet brav eo ar gelaouenn-mañ. Kavout a reer en niverenn-mañ un arnod talvoudus da resizañ ster gerioù zo a vez implijet alies gant ar stourmerion vrezhon. Moarvat e vefe tu da vurutellañ pe da sklaeraat kealioù zo hogen vevel m'emañ ez eo dedennus an arnod-mañ. Skrivañ da SKOL VREIZ, Run avel, 29 245 PLOURIN-MORLAIX KRP 2248-25 Roazhon. 20 lur evit 6 niverenn.

Komz a raimp eus kelaouennoù all en niverenn a zeu.

A N E M S A V H A G A R S P O N T E R E Z H

gant Jakez ar BIHAN

(2) Goude an eil brezel-bed hag araok an F.L.B.

E 1955 e voe didamallet Yann FOUERE gant al leziou-barn gall. D'ar 16 a viz mae 1956 e reas ur brezegenn dirak studierien ar J.E.B. (Studierien Yaouank Breizh) e Roazhon, war an danvez-mañ : "Eus Breizh da Vro-C'hall ha da Europa". Da heul ar brezegenn-se e tiwanas ar P.O.B. ("Projet d'Organisation de la Bretagne", Raktres Kenurzhiñ Breizh) savet gant Yann FOUERE, Yann POUPINOT hag a-hervez ivez gant Joseph MARTRAY (a genlaboure diwezhatoc'h da sevel al levr "L'Avenir de la Bretagne" (Dazont Breizh) sinet gant René PLEVEN hag embannet e 1961). Kinniget e voe ar P.O.B.-se d'ur bern tud e Breizh ha sinet gant kalz maered, kuzulierien-departamant ha personelezhioù liesseurt.

D'an 10 a viz du 1957 e voe aozet e maerdi an Oriant ur vodadeg vras eus sinerien ar P.O.B. ha divizet e voe ganto krouiñ un aozadur politikel nevez, ar M.O.B. ("Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne", Luskad evit Kenurzhiñ Breizh). Ouzh e benn e voe kavet Ronan GOARANT, Yann FOUERE, Yann POUPINOT ha Pierre LEMOINE. Hemañ en doa embannet betekhenn ur gelaouenn viziek, hec'h anv "Ar Vro-Jeune Bretagne", a baouezas da zont er-maez diwar neuze ha kemeret e voe lec'h gant "L'Avenir" (An Dazont), deuet ha vezañ diwezhatoc'h "L'Avenir de la Bretagne", kelaouenn gefridiel ar M.O.B. (1).

E-pad ar prantad 1954-1962 edo ar riez gall o ren ur brezel kriz ouzh ar vroadelourien aljeriat ha kaset e voe da stourm outo kalz Brezhoned yaouank. Gant an darvoudoù-se ha darvoudoù all er riez gall e tiwan e diabarzh ar M.O.B. un tu kleiz hag enebiñ a ra hemañ muioc'h-mui ouzh renerezh al luskad, dreist-holl ouzh Yann FOUERE. Kuitaat a ra an dud yaouank-se ar M.O.B. evit mont da grouiñ e 1964 un aoadur nevez : U.D.B. (Unvaniezh Demokratel Breizh) a stag da embann d'he zro ur gelaouenn viziek e galleg "Le Peuple Breton" (Pobl Vreizh) ha da c'houde ivez ur follenn vrezhonek miziek Pobl Vreizh.

Evit klokaat taolenn al ledemsavioù o tiwanañ d'ar mare-se e ranker komz eus Gérard TOUBLANC, ur paotr yaouank a glaskas e 1961 tagañ disentez ul lez-varn war ziazez feur-emglev 1532. Gant skoazell Alain GUEL en em ginnigas e 1962 en dilennadegoù. Krouiñ a reas ivez ar "Mouvement Révolutionnaire Breton" (Luskad Dispac'hel Breizhat), gantañ ar gelaouenn Labour. Mervel a reas e 1965 da heul ur gwallzarvoud hag e luskad a varvas gantañ.

Skouerius eo istor an U.D.B. hag istor TOUBLANC eus emdroadur al ledemsavioù abaoe ar brezel. A vare da vare e teu un hinienn da grouiñ un aozadur ma chom e gwirionez e-unan ennañ ha dont a ra a-benn da embann ur gelaouennig e-

(1) Notenn : E 1959 e vo adkemeret an titl Ar Vro gant Per DENEZ a grouo ur gelc'hgelaouenn drimiziek, enni pennadoù e galleg hag e brezhoneg. Skoazellet e vo e-pad un nebeut bloavezhioù gant G. ETIENNE ("AbAnna") ha R. PENNEG. E 1966 avat e tremeno renerezh Ar Vro e daouarn Fant Rozeg MEAVENN a lezas buan ar gelc'hgelaouenn dalvoudus-se da vont da get. Paouez a raio da zont er-maez evit mat e dibenn 1967.



lec'h ma skriv koulz lavaret an holl bennadoù ha zoken... lizhiri al lennerien ! A vare da vare e weler ivez un aozadur en deus kresket un tammig ha gounezet brud ha nerzh, hag eñ da darzhañ, darn eus e izili o vont da grouiñ un aozadur enebet ouzh an hini kentañ, hag a chomo ken gwan all, da c'hortoz kreskiñ un tammig ha tarzhañ d'e dro, evel ul lezenn naturel bar da rannadur ar c'helligoù...

Ne oa ket al ledemsavioù-se evit c'hoari gant ar sponterezh na ken-nebeut an Emsav, bodet en-dro d'ar gelaouenn Al Liamm hag ivez diwezhatoc'h d'ar gelaouenn Ar Vro. E pobl Vreizh avat e c'hoarvezas meur a wech didarzhioù feulster goude ar brezel, darvoudoù a ziskoueze pegen grevus e oa stad an traoù en hor bro. Tu a zo da venegiñ harzoù-labour garv ar vicherourien e Naoned ha Sant-Nazer met ret eo komz dreist-holl amañ eus tousmac'h ar gouerien rak un emroadur kriz-meurbet eo bet hini o micher abaoe ugent vloaz ha koazhet eo buan o niver.

D'an 23 a vezheven 1961 (deiz-ha-bloaz an trec'h e Ballon met ne voe nemet ur c'hendegouezh) e voe aloubet isprefeddi Montroulez gant miliadoù a gouerien ha dirollañ a reas o c'hounnar e meur a zibunadeg all e-pad ar bloavezh-se. Gant ar C.E.L.I.B. (Poellgor evit Studiañ ha Liamañ an Aferioù Breizhat) e voe savet un danvez-lezenn-stur ("Loi-Programme") a ginnige diskoulmoù resis da gudennoù armerzhel hor bro. D'an dilennadegoù hollek e 1962 e voe dilennet e Breizh ur bern kannaded U.D.R. (strollad a-du gant gouarnamant De GAULLE, eus an tu dehou dre vras), o doa en em ziskouezet a-du gant an danvez-lezenn-stur-se. Nac'het e voe an danvez-lezenn-se gant ar gouarnamant met kement-se ne viras ket ouzh ar gannaded vreizhat da skoazellañ politikerezh ar gouarnamant nag ouzh ar Vreizhiz da vouezhiñ adarre evito e dilennadegoù 1967 ha 1968. Un dislavar splann a oa aze etre stourmoù taer ar bobl hag he dibaboù politikel ha re hir e vefe klask dezrannañ amañ an dislavar-se. Goude 1964 e yelo war zigreskiñ an nebeut levezon en doa gallet kaout ar M.O.B. war-dro 1960 ha 1962 evel stroll-gwaskañ hag aozadur-brudañ.

En em ezteurel a reas meur a wech kounnar ar Vrezhoned e doareoù emdarzhek er mare-se. E 1964, da skouer, e voe troc'het linennoù pellgomz etre Plogastell-Sant-Jermen ha Plogoneg met diaes eo gouzout piv a sevenas an torfedoù-se, brogarourien pe gouerien ? Etre 1962 ha 1968 e voe diskaret en doare-se ouzhpenn 1 000 peul-pellgomz e departamant Penn-ar-Bed hepken ! A-vare-da-vare e kaver ivez amañ hag ahont enskrivadurioù flemmus livet ouzh ar mogerioù : "Breizh atav !" "Breizh dieub !", "Labour e Breizh !", "Ar C'hallaoued er-maez !" ha re all c'hoazh. Alies e c'hoarvez ivez gant paotred yaouank mont da dennañ kuit bannieloù gall gwintet da geñver ur gouel folklorel bennak e Kemper, Brest pe ur gêr all.

Etouez darvoudoù all ar mare-se e c'heller menegiñ ar "Garta Izek" ("Charte Minimale") a voe kinniget e 1966 gant ar Gorsedd evit Breizh. Degemeret e voe gant ar M.O.B., gant ar c'hlub "Bretagne et Démocratie" (Breizh ha Demokratielezh, eus an tu kleiz), gant al luskad "Occident" (aozadur faskour gall)(!!!???) ha gant aozadurioù dister all. E gwirionez ne dalvezas ket da galz tra an destennese.

E 1966 e voe ijinat ar "peg-sun" BZH evit an tankirri, gant izili'zo eus ar M.O.B. e Paris hag ur berzh souezhus a reas buan an arouez-se. Berz a voe lakaet dizale warnañ gant ar gouarnamant gall hag e-pad ur mare e tremenas evit un arouez damzispac'hel, met gant an amzer o tremen e voe degemeret gant an holl ha kavet e vez hiziv war galz kirri e Breizh. E gavout a reer zoken e diadrefiv kirritan touristed alaman pe saoz (!). Kollet en deus darn eus e dalvoudegezh evit dont da vezañ evit kalz tud un dra folklorel a-walc'h. Kavet e vez zoken ar BZH hiziv war voutilhoù gwin-ardant ha war bakadoù krampouezh !. Heñveldra pe dost a zo

c'hoarvezet gant hor banniel, deuet da vezañ boutin a-walc'h hiziv e pep lec'h en ur goll e dalvoudegezh evel arouez ar vroadelezh vrezhon.

Arabat duañ an daolenn avat. Diskouez a reas an holl zarvoudoù-se e oa c'hoazh eus an emskiant vroadel vrezhon en hor pobl ugent vloaz goude ar brezel. N'eo doa aozadur sirius ebet evit en em eztaoliñ hag heñchañ red an istor e Breizh. Ur c'hwitadenn splann e oa bet emgann al lezenn-stur da heul an dilennadegoù a zeuas war e lerc'h. War zizeriañ ez ae ar M.O.B., bihan e chome an U.D.B. ...

D'ar mare-se e reas berzh levrioù talvoudus evit Breizh evel "La Bretagne Reartelée" (Breizh diempret) skrivet gant Yann FOUERE e 1962 pe "Histoire de Bretagne" (Istor Breizh) gant Joseph CHARDRONNET. Edo o kreskiñ ivez nebeut ha nebeut niver ar re yaouank o teskiñ ar brezhoneg el lec'h-mañ-lec'h, o kreskiñ ivez niver ar skolidi gant Marc'harid GOURLAOUEN en he skol dre lizher "OBER", o kreskiñ dreist-holl niver an dornlevrioù gwerzhet a vloaz da vloaz, evit deskiñ hor yezh... Birviñ a rae ar mennozioù breizhat e kalz pennoù yaouank a adkave hent o henaourien.

Ouzhpenn se o doa arvestet ouzh an didrevadennidigezh. Ne oa ket mui eus an impalaeriezh c'hall. Goude ur brezel kriz e oa bet roet he frankiz da Indosina e 1954 goude trec'h bras ar vroadelourien war ar C'hallaoued e Dien-Bien-Phu. Brezel Aljeria a voe bras e levezon dreist-holl rak gwelet e voe ar gouarnamant gall o reiñ he frankiz da bobl Aljeria e 1962, pevar bloaz hepken goude bezañ diskleriet e oa Gallaoued penn-kil-ha-troad eus an Aljerianed ha goude bezañ embannet e pep lec'h en em astenne Frañs eus Dunkirk da Damanraset (hag eus Strassburg da Vrest moarvat !) ! Riezoù dieub e teuas da vezañ neuze kalz broioù en Azia, en Amerika ha dreist-holl en Afrika, "broioù" kevanaozel ("artifisiel") alies hag a oa kalz paouroc'h eget Breizh ha bihanoc'h o foblañs alies eget hini hor bro.

Ma talc'her kont ivez eus levezon an emsav-dieubiñ e Kuba, e Suamerika, er Viet-Nam hag e broioù all c'hoazh, war speredoù an dud (hep menegiñ levezon an istor iwerzhonat war galz emsaverien, ul levezon atizet c'hoazh e 1966 gant 50vet deiz-ha-bloaz Dispac'hadeg Pask), ne oa ket dic'hortoz un argerzhad ("prosesus") o kas d'ar sponterezh e Breizh. Ur skouer ouzhpenn a voe roet e 1967 gant al leviour gall, Charles De GAULLE, e-pad e veaj e Kanada, pa yelas da youc'hal : "Vive le Québec Libre !" (Bevet Kebeg dieub !).

(Pennad da zont : An F.L.B. kentañ)

---

### Kendalc'h Keltiek Etrevroadel

E Breizh e vo dalc'het e 1974 ar C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel. Padout a raio eus ar meurzh 13 a viz eost betek ar sul 18. Dibabet eo bet evit ar vodadeg vras-se kêr vrasañ Breizh, kêr Naoned, evit diskouez ur wech ouzhpenn dirak an holl pegen stag eo Bro-Naoned ouzh peurrest hor bro. Lojet ha maget ec'hello bezañ ar gendalc'hidi e tiez ar studierien hag aozet e vo an emvodoù-labour e Skol-Veur al Lizheroù. E Kastell an Duged e vo aozet moarvat abadennoù bras diouzh an abardaez. Pedet eo evel-just an holl emsaverien, en o zouez lennerien Imbourc'h d'ar C'hendalc'h bras-se.

Diskleriadurioù : Ao. Per DENEZ "Ri"

Ploare 29100 DOUARNENEZ

---

Liesskrivet gant ar gelaouenn CPPP 50 015 Ar rener : Y. Ollivier